



O Jean the Choni a-dre' har
ar kizon kuz gundall - for
roas hor fuz, wit danting fuz that
oh kennyat adhanong - and
trechomp I hor tro - and ene bawley
hor Feiz en bawley hor Bro

44586

KANTIKOU

BREZOUNEK

ESKOPTI KEMPER HA LEON



KEMPER

MOULLET E TI ARSÈNE DE KERANGAL

Mouller ann Eskopti

THEODORE LAMARCHE, Eskop Kemper ha Leon,

Rei a reomp kounje d'ann A. DE KERANGAL, mouller ann Eskopti, da voulla *Kantikou Brezounek Eskopti Kemper ha Leon, renket a nevez dre urs ann Aotrou'nn Eskop Nouvel.*

Roet e Kemper, gant hor sinatur, siell hon armou ha sinatur hor Sekretour, ann 31 a viz meurs 1888.



† THEODORE,

Eskop Kemper ha Leon.

Dre urs ann Aotrou'nn Eskop,

FEYRON, Chaloni,

Sekretour ann Eskopti.

PEDENNOU DIOUZ AR MINTIN

E KERNE

Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet gret.

Evit adori Doue.

M'hoc'h ador, ma Doue, ma c'hrouer,
M'hoc'h ador, Jezuz, ma zalver ;
Hirio ha keit ha ma vevinn
Ho servicha humbl a fell dinn.

Evit trugarekaat Doue.

M'ho trugareka, ma Aotrou,
Evit hoc'h holl madelezou :
D'am beza krouet, konservet,
Prenet, enn Iliz resevet.

Evit en em rei da Zoue.

Kement a rinn, a livirinn,
A zonzinn hag a andurinn,
A offrann holl da c'hloar Doue
Dreizhoc'h, Mari, mamm a drue.

Evit prometi beza fidel da Zoue.

Me a bromet en em viret,
Gant gras Doue, diouz peb pec'hed
Hag observi lezenn Doue
Evit plijout d'he vajeste.

Leunth Lysred

Evit goulenn gras Doue.

Ar c'hras d'ho karenn mat bepred
O ma Jezuz, sellit ouzinn
Ha roit d'inn ar pezh a fell d'inn ;
Roit d'inn ar c'hras d'ho karenn bepred
Hag ar c'hras n'hoc'h offansinn ket.

Evit pedi ar Verc'hez.

Guerc'hez Vari, mamm benniget,
Var va maro ma zikouret,
Guerc'hez Vari, mamm da Zoue,
O pet truez ouz va ene.

Evit pedi ann El-Mad.

Ha c'houi, ma El-Mad, kannad Doue,
Miret ma c'horf ha ma ene,
Ma miret ouz ann drouk-spered
Ha dreist peb tra diouz peb pec'hed.

En henor d'hor Patron pe d'hor Patronez.

Ma faeron, ne veritann ket
Dougen ann hano a zouget ;
Goulskoude, pa'm euz ann henor,
O pet truez ouz ho fillor.

Ar merc'hed a lavaro :

Va maeronez, ne veritann ket
Dougen ann hano a zouget ;
Mes me ho ped, ma maeronez,
O pet sonj euz ho fillorez.

Evit pedi Jezuz-Krist hag ar Zent.

Jezuz, Mari ha Joseph, Anna ha Joachim,
Sant Mikael, ma El-Mad, sant Per, sellit ouzinn ;
Ma faeron, santez Barba, gloriuz sant Korantin,
Breman ha var va maro o pet truez ouzinn.

Evit esperout e Doue ha goulenn hon ezommou.

Pater noster, qui es in cœlis, sanctificetur
nomen tuum ; adveniat regnum tuum ; fiat vo-
luntas tua, sicut in cœlo et in terrâ ; panem
nostrum quotidianum da nobis hodie ; et di-
mitte nobis debita nostra, sicut et nos dimitti-
mus debitoribus nostris ; et ne nos inducas in
tentationem ; sed libera nos à malo. Amen.

Hon Tad, pehini zo enn env, hoc'h hano
bezet santifiet ; roit d'eomp ho rouantelez ; ho
polontez bezet gret var ann douar evel enn env ;
roit d'eomp hirio hor bara pemdeziek, ha
pardounit d'eomp hon offansou, evel ma pardou-
nomp d'ann nep en deuz hon offanset ; ha n'hon
abandounit ket d'ann dentasion, mes hon dili-
vrit a zrouk. Evelse bezet gret.

Evit pedi hag henori ar Verc'hez.

Ave, Maria, gratiâ plena, Dominus tecum,
benedicta tu in mulieribus, et benedictus fruc-
tus ventris tui, Jesus. Sancta Maria, mater Dei,
ora pro nobis peccatoribus, nunc et in horâ
mortis nostræ. Amen.

Me ho salud, Mari, leun a c'hras, ann Aotrou

Doze zo ganehoc'h, benniget oc'h dreist ann holl gragez. ha benniget eo ar frouez euz ho kof, Jezuz. Santez Mari, mamm da Zoue, pedit evidomp-ni pec'herien, breman hag enn heur euz hor maro. Evelse bezet gret.

Evit kredi a galoun ann holl artiklou euz ar Feiz.

Credo in Deum Patrem omnipotentem, creatorem coeli et terræ, et in Jesum-Christum, Filium ejus unicum, Dominum nostrum, qui conceptus est de Spiritu-Sancto, natus ex Mariâ virgine, passus sub Pontio-Pilato, crucifixus, mortuus et sepultus; descendit ad inferos, tertiâ die resurrexit à mortuis; ascendit ad cœlos; sedet ad dexteram Dei Patris omnipotentis, indè venturus est judicare vivos et mortuos. Credo in Spiritum-Sanctum, sanctam Ecclesiam catholicam, Sanctorum communionem, remissionem peccatorum, carnis resurrectionem, vitam æternam. Amen.

Me gred e Doue, ann Tad holl-c'halloudek, krouer ann env hag ann douar, hag e Jezuz-Krist he Vab unik, hon Aotrou, pehini zo bet konsevet dre vertuz ar Spered-Santel, ganet gant ar Verc'hez Vari, en deuz gonzanvet dindan Pons-Pilat, zo bet krusifiet, maro ha sebeliet; zo diskennet d'ann iferniou; d'ann trede deiz resusitet a varo da veo; zo pignet en env, a zo azezet enn tu deou da Zoue ann Tad holl-c'halloudek, ac'hanô e teui da varn ar re veo hag ar re varo. Me gred er Spered-Santel, enn Iliz

santel katholik, kommunion ar Zent, remission ar pec'hejou, rezureksion ar c'hik, ar vuez eternal. Evelse bezet gret.

Evit goulenn pardounn euz hor pec'hejou.

Confiteor Deo omnipotenti, beatæ Mariæ semper virgini, beato Michaeli archangelo, beato Joanni-Baptistæ, sanctis apostolis Petro et Paulo, et omnibus Sanctis, quia peccavi nimis cogitatione, verbo et opere: meâ culpâ, meâ culpâ, meâ maximâ culpâ. Ideo precor beatam Mariam semper virginem, beatum Michaellem archangelum, beatum Joannem-Baptistam, sanctos apostolos Petrum et Paulum, et omnes Sanctos orare pro me ad Dominum Deum nostrum.

Me govez ouz Doue holl-c'halloudek, ouz ar Verc'hez gloriuz Vari, ouz ann Aotrou sant Mikael arc'hel, ouz ann Aotrou sant Iann-Vade-zour, ouz ann ebestel sant Per ha sant Paol, hag ouz ann holl Zent, abalamour m'am euz pec'het braz dre zonz, dre gomz, dre ober: dre ma faot, dre ma faot, dre ma brasa faot. Rak-se e pedann ar Verc'hez gloriuz Vari, ann Aotrou sant Mikael arc'hel, ann Aotrou sant Iann-Vade-zour, ann ebestel sant Per ha sant Paol, hag ann holl Zent da bedi Doue evidon.

Evit karet Doue hag hon nesa.

GOURC'HEMENNOU DOUE.

1. Eunn Doue hebken a adori
Ha dreist peb tra holl a gari.
2. Heb kaoz he hano na doui ket,
Nag ive netra all ebed.

e han no doui ket

3. Miret a ri ann holl zuliou
Gant euvrou mad ha pedennou.
4. Da dad, da vamm a henori,
Ha da vuez a astenni.
5. Ha mir ne lazi den ebed
Nag a galon, nag a effet.
6. Lubrik mir na vezi nepred,
Dindan boan da veza daonet.
7. Enn em ziousall diouz laeronsi,
Na dommaj d'az hentez na ri.
8. Na gevier na fals testeni
Mir birviken na liviri.
9. Madou re all ne zezir ket
Evit ho c'haout heb guir ebed.
10. Ne c'hoanta dre luksur pec'hi
Nag e sonj vil n'em em bliji.
Setu aze
Gourc'hemennou Doue,
Lezenn a garante,
'Vit silvidigez hon ene.
GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ.
1. Kleo devot a benn-da-benn,
Bep sul, bep gouel, ann offerenn.
2. Neuze peb labour a lezi,
Evit da Zalver henori.
3. Kovez a ri, da vihana,
Eur vech er bloaz heb nac'h netra.
4. Ha da Bask e sakramanti,
Rak-se e stad vad e vevi.
5. Iun a ri ann daouzek deiziou,
Ar c'houraiz hag ar vijilou.
6. Na da zadorn, na da vener,
Na zebri kig e neb amzer.

*Vil ar zont anken la vuez
enn vijil e pep amzer*

LITANIOU JEZUZ.

Kyrie, eleïson.
Christe, eleïson.
Kyrie, eleïson.
Jesu, audi nos.
Jesu, exaudi nos.
Pater de cœlis, Deus, miserere nobis.
Fili redemptor mundi, Deus, miserere nobis.
Spiritus-Sancte, Deus, miserere nobis.
Sancta-Trinitas, unus Deus,
Jesu Fili Dei vivi,
Jesu splendor Patris,
Jesu candor lucis æternæ,
Jesu rex gloriæ,
Jesu sol justitiæ,
Jesu fili Mariæ virginis,
Jesu amabilis,
Jesu admirabilis,
Jesu Deus fortis,
Jesu pater futuri sæculi,
Jesu magni consilii angele,
Jesu potentissime,
Jesu patientissime,
Jesu obedientissime,
Jesu mitis et humilis corde,
Jesu amator castitatis,
Jesu amator noster,
Jesu Deus pacis,
Jesu auctor vitæ,
Jesu exemplar virtutum,
Jesu zelator animarum,
Jesu Deus noster, miserere nobis.

Jesu refugium nostrum, miserere nobis.
 Jesu pater pauperum,
 Jesu thesaurus fidelium,
 Jesu bone pastor,
 Jesu lux vera,
 Jesu sapientia æterna,
 Jesu bonitas infinita,
 Jesu via et vita nostra,
 Jesu gaudium angelorum,
 Jesu rex petriarcharum,
 Jesu magister apostolorum,
 Jesu doctor evangelistarum,
 Jesu fortitudo martyrum,
 Jesu lumen confessorum,
 Jesu puritas virginum,
 Jesu corona sanctorum omnium, miserere nobis.
 Propitius esto, parce nobis, Jesu.
 Propitius esto, exaudi nos, Jesu.
 Ab omni malo, libera nos, Jesu.
 Ab omni peccato,
 Ab irâ tuâ,
 Ab insidiis Diaboli,
 A spiritu fornicationis,
 A neglectu inspirationum tuarum,
 A morte perpetuâ,
 Per mysterium sanctæ incarnationis tuæ,
 Per nativitatem tuam,
 Per infantiam tuam,
 Per divinissimam vitam tuam,
 Per labores tuos,
 Per dolores tuos,
 Per agoniam et passionem tuam,
 Per crucem et derelictionem tuam, libera nos, Jesu.

Per languores tuos, libera nos, Jesu.
 Per mortem et sepulturam tuam,
 Per resurrectionem tuam,
 Per ascensionem tuam,
 Per gloriam tuam, libera nos, Jesu.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, parce nobis, Jesu.
 Agnus Dei qui tollis peccata mundi, exaudi nos, Jesu.
 Agnus Dei qui tollis peccata mundi, miserere nobis, Jesu.
 Jesu, audi nos.
 Jesu, exaudi nos.
 Sit nomen Domini benedictum,
 Ex hoc nunc et usque in sæculum.

OREMUS.

Domine Jesu-Christe, qui dixisti : petite et accipietis, quærите et invenietis, pulsate et aperietur vobis, quæsumus, da nobis petentibus divinissimi tui amoris affectum, ut te toto corde, ore et opere diligamus, et à tuâ nunquam laude cessemus. Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum.

Amen.

Angelus Domini nuntiavit Mariæ, et concepit de Spiritu-Sancto. — Ave Maria, etc.

Ecce ancilla Domini, fiat mihi secundum verbum tuum. — Ave Maria, etc.

Et Verbum caro factum est, et habitavit in nobis. — Ave Maria, etc.

Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix,
 Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS.

Gratiam tuam, quæsumus, Domine, mentibus nostris infunde, ut qui, angelo nuntiante, Christi Filii tui incarnationem cognovimus, per passionem ejus et crucem ad resurrectionis gloriam perducamur. Per eundem Christum Dominum nostrum. Amen.

PEDENNOU DIOUZ ANN NOZ

E KERNE

Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet gret.

Evit trugarekaat Doue.

M'ho trugareka, ma Aotrou,
Evit hoc'h holl madelezou :
D'am beza krouet, konservet,
Prenet, enn Iliz resevet.

Evit goulenn sklerijenn da anaout hor pec'hejou.

Roit d'inn, va Jezuz, guir c'houlou
Evit anaout ma fec'hejou.
Sonjit, ma ene, em offansou,
Euvrou, komzou, sonjezonou.

Evit goulenn pardon euz hor pec'hejou.

Keuz am euz da veza offanset
Ma Doue din da veza karel.
Me a bromet d'en em viret,
Gant gras Doue, diouz peb pec'hed.

(Guerc'hezVari, etc., pajenn 4, betek Litanieu Jezuz.)

LITANIOU AR VERC'HEZ.

Kyrie, eleïson.
Christe, eleïson.
Kyrie, eleïson.
Christe, audi nos.
Christe exaudi nos.
Pater de cœlis, Deus, miserere nobis.
Fili redemptor mundi, Deus, miserere nobis.
Spiritus-Sancte, Deus, miserere nobis.
Sancta-Trinitas, unus Deus, miserere nobis.
Sancta Maria, ora pro nobis.
Sancta Dei genitrix,
Sancta virgo virginum,
Mater Christi,
Mater divinæ gratiæ,
Mater purissima,
Mater castissima,
Mater inviolata,
Mater intemerata,
Mater amabilis,
Mater admirabilis,
Mater Creatoris,
Mater Salvatoris,
Virgo prudentissima,
Virgo veneranda,
Virgo prædicanda,
Virgo potens,
Virgo clemens,
Virgo fidelis,
Speculum justitiæ,
Sedes sapientiæ,
Causa nostræ lætitiæ, ora pro nobis.

Vas spirituale, ora pro nobis.

Vas honorabile,

Vas insigne devotionis,

Rosa mystica,

Turris davidica,

Turris eburnea,

Domus aurea,

Fœderis arca,

Janua cœli,

Stella matutina,

Salus infirmorum,

Refugium peccatorum,

Consolatrix afflictorum,

Auxilium christianorum,

Regina angelorum,

Regina patriarcharum,

Regina prophetarum,

Regina apostolorum,

Regina martyrum,

Regina confessorum,

Regina virginum,

Regina sanctorum omnium,

Regina sine labe originali concepta,

Regina sacratissimi rosarii, ora pro nobis.

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, parce nobis, Domine.

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, exaudi nos, Domine.

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, miserere nobis.

Christe, audi nos.

Christe, exaudi nos.

Sub tuum præsidium confugimus, sancta Dei

Genitrix ; nostras deprecationes ne despicias in necessitatibus nostris, sed à periculis cunctis libera nos semper, Virgo gloriosa et benedicta.

Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix,

Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS.

Defende, quæsumus, Domine, beatâ Mariâ semper virgine intercedente, istam ab omni adversitate familiam et toto corde tibi prostratam, ab hostium propitius tuere clementer insidiis. Per Christum Dominum nostrum.

Evit ann anaoun.

De profundis clamavi ad te, Domine ; Domine, exaudi vocem meam.

Fiant aures tuæ intendentes, in vocem deprecationis meæ.

Si iniquitates observaveris, Domine, Domine, quis sustinebit ?

Quia apud te propitiatio est, et propter legem tuam sustinui te, Domine.

Sustinuit anima mea in verbo ejus ; speravit anima mea in Domino.

A custodiâ matutinâ usque ad noctem, speret Israël in Domino.

Quia apud Dominum misericordia, et copiosa apud eum redemptio.

Et ipse redimet Israël ex omnibus iniquitatibus ejus.

Requiem æternam dona eis, Domine, et lux perpetua luceat eis.

Requiescant in pace. Amen.

OREMUS.

Fidelium, Deus, omnium conditor et redemptor, animabus famulorum famularumque tuarum remissionem cunctorum tribue peccatorum, ut indulgentiam quam semper optaverunt piis supplicationibus consequantur. Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum. Amen.

Ann Angelus e brezounek.

Eunn Arc'hel a berz ann Aotrou
A ziskennas euz ann envou, (bis)
D'annons da Vari oa choazet
Evit mamm da Zalver ar bed. (bis)

Ave, Maria.

Mari a respountaz neuze :
Servicherez ounn da Zoue,
Bezef gret eta em andred
Hervez m'oc'h euz d'inn annonset.

Ave, Maria.

Neuze 'konsevez eur bugel
Dre vertuz ar Spered-Santel,
Hag ar Verb en em inkarnet
Etouez ann dud en deuz bevet.

Ave, Maria.

Pedit, Mamm zantel da Zoue,
Evidomp holl he vajeste,
Ma vezimp din euz ar grason
A bromet Jezuz, hon Aotrou.

Gloria Patri, etc.

Enn amzer zantel a Bask.

En em gonzolit evit mad,
Rouanez euz ann envou ;
Sec'hit pelloc'h ho taoulagad
Hag-arretit ho-taelou ; *Gouerin*
Resusitet ez eo ho Mab *chant da stoull da bar*

Leun a c'hloar, a driadphou. *a evision*

— Alleluia ! Pebez joa *o pebez joa*

D'ehoc'h-hu, Mamm a garantez !

D'eomp-ni ivez, alleluia !

Pebez laouenedigez,

He velet, goude hor prena,

Adarre leun a vuez !

Ia, Guerc'hez, bezit joaiz,

O pet konsolasion,

Resusitet ez eo Jezuz,

Hervez he brediksion.

Dirazhan, Mamm drugarezuz,

Roit d'eomp ho proteksion.

— Alleluia, etc.

Va Doue, o resusita

Ho Mab Jezuz, hon Aotrou,

E karge'hoc'h ar bed a joa,

Grit d'eomp dre be veritou

Ha re ann Itron Varia

Mont holl da c'hloar ann envou.

— Alleluia, etc.

ANGELUS.

Ni ho salud gant karantez,
Rouanez ar Zent hag ann Elez :
C'houi a zo benniget,
O pia,
Hag a c'hrasou karget,
Ave Maria !

Ra vezo benniget Jezuz
Ar frouez euz ho kof evuruz !
Kanomp gant ann Elez,
O pia,
He veuleudi bemdez,
Ave, Maria !

Ni ho ped, Mari, guerc'hez c'hlan,
Pa vezimp var hon tremenvan,
Da c'houlenn ouz Jezuz,
O pia,
Deomp eur maro evuruz,
Ave Maria !

PEDENNOU DIOUZ AR MINTIN

EVIT TUD LEON

Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet great.

O Tad, Mab ha Spered-Santel,
Me gred oc'h eunn Doue eternal,
Krouer ann holl, partout prezant,
Me hoc'h ador devotamant.

Me gred oc'h tri fersoun divin,
Ho zri ker braz, ker fur, ken din,
Distink ann eil diouz egile,
Eunn Doue ho zri, noun pas tri Doue.
Me gred oc'h just ha gallouduz,
Da rei d'ar viz ha d'ar vertuz
Dioc'h ar mirit ar rekoumpans,
Punision diouz ann offans.

Me gred ann inkarnasion
Ha mister hon redempcion :
C'houi, Mab Doue, en en c'hreat den
Evit prena'nn natur humen.

M'hoc'h ador, Jezuz, va zalver,
Er zakramant euz ann aoter ;
Me gred emac'h ennhan prezant,
Guir den, guir Doue realamant.

Konsakri a rann va dervez
D'ho kloar ha d'am zilvidigez,
Hag ec'h offrann va holl boaniou
E pinijenn d'am fec'hejou.

Pater, Ave, Credo, Confiteor, Litanieu Jezuz.

PEDENNOU DIOUZ ANN NOZ

EVIT TUD LEON

Konsakri a rann va nozvez
D'ho kloar ha d'am zilvidigez,
Hag ec'h offran va holl boaniou
E pinijenn d'am fec'hejou.

Eksaminomp hor c'houstians.

Pardoun, va Doue trugarezuz,
Pardoun, enn hano va Jezuz ;

Keuz am euz 'palamour d'ehoc'h,
Gant ho kras me jencho pelloc'h.

Guerc'hez Vari, guir vamm Doue,
C'houi zo va fizians 'nn he c'houde,
Ha c'houi, sant Joseph, he fried,
Ouzhoc'h ho taou m'en em erbed.

O Kaloun sakr euz va Jezuz,
Kaloun meurbet karantezuz,
Ra viot da viken karet
Ha da virviken adoret !

*Pater, Ave, Credo, Confiteor, Litanious ar
Verc'hez, De profundis, Angelus.*

GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eunn Doue hebken a adori,
Ha dreist pep tra holl a giri.
2. E vean he hano na doui ket,
Nag ive netra all ebed.
3. Ar zuliou santel a viri
E servich Doue, ouz he veuli.
4. Da dad, da vamm a henori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Diouall na lezi den ebed,
Nag a zezir, nag a effet.
6. Lubrik na vezi ket ivez,
Nag a gorf, nag a volonteiz.
7. Laerez na miret madou den,
E gouiziegez na ri biken.
8. A enep den fals testen
Na gaou ebed na liviri.

9. Ne c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag e sonj vil n'en em lezi.

10. Na souhet madou da hentez,
Evit ho c'haout dre fallzentez.

GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ.

1. Ar goueliou berz a zantifi,
Neuze peb labour a lezi.
2. Ha kleo devot a benn-da-benn,
Sul ha guel berz, ann offerenn.
3. Eur vech er bloaz, da vihana,
E kovesai heb nac'h netra.
4. Ha da Grouer a resevi,
Da Bask, devota ma c'helli.
5. Iun a ri ann daouzek deiziu,
Ar c'houraiz hag ar vijilou.
6. Kig, nemed da zeiz Nedelek,
Guener ha sadorn ne zebr ket.

PEDENNOU TREGER

DIOUZ AR BEURE HA DIOUZ ANN NOZ

Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezel gret.

Akt a fe var brezans Doue.

Va Doue, me gred fermamant
Penaoz e oc'h ama prezant,
Rak-se gant guir humilite
Me rent hommach d'ho majeste.

Akt a adoration.

M'hoc'h ador, Doue, va c'hrouer,
M'hoc'h ador, Jezuz, va zalver,
C'houi eo va mestr ha va roue,
Ha d'ehoc'h ounn tout korf hag ene.

Akt a drugare.

M'ho trugareka, va Aotrou,
Demeuz hoc'h holl madelezou,
D'am beza krouet ha prenet,
Hag enn hoc'h Iliz resevet.

Akt a offrans.

Kement a rinn, a livirinn,
A zonjinn pe a andurinn,
A offrann holl da c'hloar Doue,
Dreizhoc'h Mari, mamm a drue.

Eksamin a goustians.

Va Jezuz, roit d'inn sklerijenn
Evit ober va eksamen,
Hag eur gontrision barfet
A gement pec'hed am euz gret.

Akt a gontrision.

Va Doue, me zo glac'haret
D'ho pea kement offanset,
Abalamour d'ho madelez,
D'ho majeste, d'ho santelez.

Resolution.

Me a bromet d'en em viret
Gant gras Doue ouz peb pec'hed,
Spesialamant ouz ar re
Ma ounn muia kustum d'ezhe.

Akt a c'houlen.

Sellit ouzinn, o va Jezuz,
Roit d'inn eur c'hras presiu,
Ar c'hras d'ho servicha fidel
Ha d'ho karet beteg mervel.

Pedenn d'ar Verc'hez.

Guerc'hez, mamm garantezuz,
Va rekommandit da Jezuz.
Guerc'hez, va mamm ha va itron,
Me rekommand d'ehoc'h va c'halon.

Pedenn d'ann El-Mad.

Va El-Mad, mesajer Doue,
Miret va c'horf ha va ene,
Va miret ouz ann drouk-spered
Ha dreist pep tra ouz ar pec'hed.

Pedenn d'ann holl Zent.

Me ho ped, Sent ha Sentezed,
Da vea va advokaded,
Obtenit d'inn digant Jezuz
Eur maro mad hag evuruz.
Pater, Ave, Credo, Confiteor.

GOURC'HEMENNOU DOUE

1. Eunn Doue hebken a adori
Ha dreist pep tra holl a giri.
2. Doue enn ven na doui ket,
Na netra all demeuz ar bed.
3. Ar zuliou santel a viri,
Evit Doue ma servichi.

4. Da dad, da vamm a henori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Munttrer ne vi e nep feson,
Nag a effet, nag a galon.
6. Diousall ouz al lubrisite
Nag a gorf, nag a volonte.
7. Dommach ebed da zen na ri,
Mar arc'h euz gred, hast rapari.
8. Gevier na nep fals testeni
Mir birviken na liviri.
9. Ne c'hoanta dre luksur pec'hi
Nag enn sonj vil n'en em bliji.
10. Madou real ne zezir ket
D'ho c'hemeret heb lealdet.

GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ

1. Kleo devotamant penn-da-benn,
Bep sul, bep goel, ann offerenn.
2. Santifia 'ri ar goeliou
Var ho hed, evel ar zuliou.
3. Kovez d'ar bec'hejou heb mez,
Da vihana bep bla' eur vech.
4. Korf da Zalver a resevi,
Enn amzer Bask heb differi.
5. Iun a ri ann daouzek deiou,
Ar c'horaiz hag ar vigilon.
6. Da voener kig na zebri ket,
Nag ivez d'ar zadorn nepred.

Litaniou Jezuz, pe litaniou ar Verc'hez.

AKTOU EVIT GOUNIT ANN INDULJANSOU

Akt a fe.

Me a gred ferm, o va Doue,
Ann holl artiklou euz ar fe,
Rak c'houi en deuz ho revelet
Hag a zo guirion pa gomzet,
Hag ann Iliz a bropos d'inn
Ann artiklou-ze da gredin.

Akt a esperans.

Va Doue, va holl esperans,
Ennhoc'h ema va holl fians,
Abalamour ma oc'h bepred
Fidel d'ho ker, mad em andred.

Akt a garante.

Doue, leun a berfeksion,
Me ho kar a greiz va c'halon,
Abalamour ma veritet
Dreist peb tra holl bea karet ;
Va nesa a garann ive
Abalamour d'ehoc'h, va Doue.

Angelus, De profundis.



KANTIKOU

1 ARAOK AR BREZEGEN.

Spered-Santel, Spered a sklerijenn,
Plijet ganehoc'h ennomp brema diskenn.
A sklerijenn kargit hor sperejou,
A garantez tommit hor c'halounou.

Ann Ebestel enn eur zal asamblet,
A dan ho kras oc'h euz bet holl karget :
Bet evidomp ar memes madelez,
Ne d-oump, siouaz ! nemed sempladurez.

Guerc'hez Vari, esperans ar pec'her,
Pedit Jezuz, ho mab hag hor zalver.
Grit d'hor spered koumpren komzou Doue
Ha d'hor c'haloun ho miret goudeze.

2 ANN AKTOU.

Akt a feiz.

Kredi a rann
Kement a ordren d'inn ann Iliz,
Kredi a rann,
Rak ar virionez he-unan,
Eunn Doue guirion eo a zesk d'ezhi
Kement a ordren d'inn da gredi,
Kredi a rann.

Akt a esperans.

Me a esper,
Va Doue, ho kras hag hoc'h euruzded,
Me a esper,
Rak ne d-eot ket enep ho ker,
Pa oc'h euz hi d'inn me prometet,
Pa'z int gant Jezuz d'in meritet,
Me a esper.

Akt a garantez.

Ah ! me ho kar
Dreist kement zo tout, o va Doue,
Ah ! me ho kar,
Dre ma'z oc'h mad ha leun a c'hloar ;
Karet a rann va nesa ive
Abalamour d'ehoc'h, o va Doue,
Ah ! me ho kar.

3 ENN OFFERENN D'AR GORREOU.

Me ho salud, korf ma Zalver,
Zo diskennet var ann aoter ;
Ennhoc'h ar bara zo chenchet,
Ha ganeoc'h e vezinn maget.

M'ho salud ivez, goad divin,
Zo er c'halir e leac'h ar guin ;
C'houi evidomp zo bet skuillet,
Deut d'hor goalc'hi a bep pec'hed.

4 PARCE, DOMINE.

Diskan.

*Parce, Domine, parce populo tuo ;
Ne in æternum irascaris nobis.*

O va Jezuz, setu deut ann amzer
Da bardouni da c'hlaç'har ar pec'her ;
Nann, biken mui, bugel divad,
Ne dreuzinn dre ar pec'hed

Kaloun va Zad.

Parce, Domine, etc.

D'ehoc'h, va Jezuz, pa'z ounn koustet ken ker,
Dre ho maro pa'z oc'h bet va zalver,
Na lezit ket ar vech-ma c'hoaz
Da vont da goll ar gounid
Eveuz ho kroaz.

Parce, Domine, etc.

Guir vab prodik, ama var va daoulin,
M'ho ped, Jezuz, o pet truez ouzinn.
Gant ma daelou ha gant ho koad
Ma goalc'hit, ma az-goalc'hit,

Oan dous ha mad !

Parce, Domine, etc.

5 EVIT AR VENEDIKSION.

Adoromp holl e sakramant ann aoter.
Eunn Doue kuzet, Jezuz hor mestr, hor zalver.
Sperejou evuruz, prinsed euz he balez,
Gant karantez ardant meulit-hen da james.

Guir Vab Doue, evidomp holl inkarnet,
Ann env, ar mor, ann douar oc'h euz krouet.
Deut, va zalver Jezuz, euz ann aoter, ho tron,
Da rei brema d'eomp holl ho penediksion.

Henor ha gloar gant karantez eternal
D'ann Tad, d'ar Mab, ive d'ar Spered-Santel.
Meulomp hag adoromp tri fersoun e Doue,
Epad ann holl amzer hag enn eternite.

6 AR MEMES TRA.

Euz a vrema betek ar maro
Meulomp Jezuz hag he hano ;
Ra vezo meulet e peb amzer
Er zakramant euz ann aoter.

Va Jezuz, dre ho pasion,
Roit d'eomp ho penediksion,
Ma c'hellimp epad hor buez
Ho servicha gant karantez.

7 VAR AR FEIZ.

Tox : Emgann ann tregont.

Doue en devez va c'hrouet
Evit he anaout, he garet,
He zervicha mad er bed-man,
Ha mont eun deiz d'ann env ganthan.

Diskan :

Kredi a rann, o va Doue,
A galoun hag e guirione,

Kement tra oc'h euz diskleriet
Ha dre ann Iliz d'inn desket.

Me a gred eunn Doue hebken
A zo a viskoaz da viken,
Eur spered pur hag holl-barfet,
En deuz a netra great ar bed.

Tri fersoun a zo e Doue
Distink ann eil diouz egile :
Ann Tad, ar Mab, ar Spered-Glan,
Parfet ha Doue peb unan.

Ar Mab, evit dont d'hor prena,
Zo bet konsevet er bed-ma
Dre vertuz ar Spered-Santel,
Hervez komz ann el Gabriel.

Gant Mari, he vamm benniget,
He vamm hag hi guerc'hez bepred,
Eo ganet enn eur c'hraou dister,
Er goanv hag er vrasa miser.

Tremenet en deuz he vuez
Ebarz er boan, er baourentez,
O tiskouez d'eomp eo dre boanion
E rankomp gounit ann envou.

Evit ar bed holl var ar groaz
E sakrifis en em offraz ;
Teir heur er groaz eo bet staget,
Ha betek ar maro poaniet.

He gorf sakr a oue sebeliet,
Hag he ene dispartiet
A ziskennaz d'ann iferniou
Da zilivra ann eneou.

Tri dervez goude ma varvaz,
Leun a c'hloar e resusitaz,
Hag enn envou eo bet pignet
Enn tu deou d'he Dad azezet.

Ac'hano e teui eunn devez
Da varn ann dud hag ann Elez ;
Neuze da zoun ann trompillou
E savimp holl euz hor beziou.

Ar re fall a iel da james
Da leski d'ar flammou griziez ;
Ar re vad a iel gant Jezuz
Da veza da yiken euruz.

78 ANN ILIZ HAG AR ZAKRAMANCHOU.

TON NEVEZ : Kroaz ann hent.

D'ar Pantekost, ar Spered-Glan *ar 1^{er} mai*
A ziskennaz e teodou-tan
Var ann Ebestel evit gouarn
Iliz Jezuz dre ho daouarn.

N'euz nemed eunn Iliz hebken
A zo famill ar gristenien,
Famill ar gristenien fidel
Dindan Jezuz hag he viket.

Enn Iliz en deuz bet lezet
Jezuz eunn tenzor kaer meurbed :
Seiz feunteun ar zakramanchou
Da skuill varnomp he veritou.

Digor eo divreac'h hor Zalver
D'ho starda gant karantez,
Rak glac'har guirion ar pec'her
D'ann Env holl 'ro levenez.

Chadennoù pounner ha mezuz
A bouez varnhoc'h marteze;
Tec'het oc'h, siouaz ! diouz Jezuz...
Distroit en han' Doue !

Hag e veac'h evel eur vezenn
Heb deliou glaz na frouez,
Dre zour nerzuz ar binijenn
C'houi a vleunio a nevez.

Diganehoc'h Doue ne c'houlenn
Nemed kaout bolontez vad
Ha krial dre nerz ho pedenn :
Pardoun d'inn, pardoun, va Zad !

Mar klevit hirio ar vouez
A ginnig d'ehoc'h baradoz,
Selaouit... Fall-fall aliez
E vez d'ar pec'her gortoz.

Va zikourit, guerc'hez Vari,
Da voalc'hi neat va c'halon;
Grit ma c'hellin heul a-zevri
Penn-da-benn ar mision.

EVIT ALIA AR PEC'HER DA OBER PINJENN.

TON ANAVEZET.

Diskan.

Poent ez eo d'ehoc'h, pec'her, } *bis.*
Distrei ouz ho Salver.

Digorit pelloc'h dor ho kaloun
Da Grouer ha Mestr peb unan;
Hir amzer zo, evel eur mignoun,
E sko, e sko... ha na rit van.

Penaoz, va breur, 'vit kaout ann tanva
Euz bara c'houero ar pec'her,
E false d'ehoc'h da viken guerza
Hoc'h ene paour d'ann drouk-spered ?

Dre nerz Doue hag he vadelez
Oc'h euz guelel ar sklerijenn;
Daoust hag ennhoc'h e c'houezaz buez
Evit pec'hi, ha netra ken !

Taolit evez, atao, var ziskenn
Ez a hent riskluz ar pec'her,
Puns ann ifern zo en ho kichen,
Ha goulskoude ne velit ket !

Enn ho kreiz, Satan enn he zaou-bleg
A guz ouzhoc'h stad hoc'h ene :
C'houi, emezhan, zo beo-buezek...
— Nann, maro oc'h dirak Doue.

Varnhoc'h eo savet eunn dourn pounner :
Tec'hit... ar c'henta ar guella;
Didruet e vezo ar barner,
Kalz tud, siouaz ! her goar dija.

Ema dibrenn ann or a druez,
Dreizhi kerzit da gaout Jezuz;
Jezuz ho stardo gant karantez
Hag hen ha c'houi vo evuruz.

12

ARAOK ANN TAOLENNOU.

Sellit piz ouz ann taolennou
Zo mellezour ann eneoù,
Hag a lavar da bep hini
Ar virionez, heb damanti.

Daou hent a zo, daou hent hebken
Emaint digor dirak peb den :
Hent ann ifern hag hent ann Ee,
Hent ar maro, hent ar vue.

Hent ann ifern, frank ha ledan,
Dre ar pec'hed a gas d'ann tan ;
Darempredet eo bet alao
Gant kalz a dud, siouaz d'ezho !

Ourgouill, koler, luksur, avi,
Avaristed ha diegi,
Gant ar vesventi milliget,
A ra eleiz a dud daonet.

Brema eo d'ehoc'h teuler evez,
Lakaat urs vad enn ho puez ;
Koll hoc'h ene eo koll peb tra...
Re zivezad e ve lenva.

A greiz kaloun hag heb gortoz
Kemerit hent ar baradoz,
Kimiadit krenn diouz ar pec'hed
Ha baleit heb nec'h ebed.

Rak ganeoc'h e vezo Jezuz
Ha ganthan e viot evuruz,
Euruz er bed, dre nerz he c'hras,
Hag enn Envou eurusoc'h c'hoaz.

13

VAR AR FINVEZIOU DIVEZA.

TON ANAVEZET.

Sonjit, den faziet,
Sonjit enn eternite !
C'houi, siouaz ! zo dallet
Gant ann drouk, ar vanite.
Sonjit e rankot mervel
Ha mont euz ar bed-ma,
Pa zeui Doue d'ho kervel
Abarz nemeur ama.

Gant kalz a spount neuze
Ez eot dirak ar Barner :
Striz eo justis Doue,
A goaz a ze d'ar pec'her.
Eur zetans a resefot
A vuez pe varo,
Hag ar stad m'en em gevfol
Da viken a bado.

Nemed eur vech hebken
Ar baradoz ne goller,
Euz ann ifern biken
En em denna ne c'heller :
Hogen baradoz kollet,
Setu tout eat da goll,
Ha baradoz gounezet
Setu gounezet holl.

Roet en devez Doue
Ar choaz d'ehoc'h, e guirionez,
Enn eil p'enn egile
Da vont divar ho puez :

Enn ifern p'er baradoz
E renkot chom atao
Da zevi pe da repoz,
Goude pred ar maro.

Gant sonjal enn traou-ze
Eaz vije d'ehoc'h kimiada
Diouz kement d'hoc'h ene
A ra eur gaou ar brasa ;
E leac'h klask tu da bec'hi
C'houi zistrofe a-grenn,
E leac'h en em beur-zaoni
C'houi rafe pinijenn.

Goulskoude oc'h ken dall,
Ken diboell, ken aheurtet,
Ma n'eus nemed traou fall
E pep korn euz ho spèred.
Dievez var ann affer
Euz ho silvidigez,
N'oc'h euz bet enn he c'henver
Nemed leziregez.

Saveteit hoc'h ene
Ha d'ann ifern renonsit,
Choazit abred ann Ee,
Lakit ho poan d'he c'hounit
Dre'nn euvrou a drugarez,
Dre ann holl vertuziou,
Ha dre eur guir garantez
'Vit Done, hon Aotrou.

Kovesait a galoun
Ho pec'hejou tremenet
Ha goulennit pardoun
O keuzia gant lealded ;

Reglit guelloc'h ho puez
Heb kredi pell beva,
Ha tremenit peb dervez
Evel ho tiveza.

Ar bed a dremeno,
C'houi a dremeno ive,
Ann ifern a jomo
Epad ann eternite.
Ar blijadur zo moged
A bad berrik amzer,
Ha bepred poaniou kalet
A voasko ar pec'her.

Tec'hit eta buhan
Divar hent fall ar pec'hed,
Pe var eur guele tan
Abred c'houi vo gourvezet.
M'oc'h euz diskouarn da zelaou,
Klevit ha klevit mad :
Choazit hirio ann Envou,
Varc'hoaz ve divezad.

14 AR VARN JENERAL

TON ANAVEZET.

Tavit, o tud heb kredenn,
Gant ho komzou goulo,
Lezit peb sot prezegenn
Ha sonjit mad hirio :

Dirak ann env, ann douar,
Holl e vezimp barnet,
Ann Eternel hel lavar,
He c'her ne jencho ket.

Diskan.

Guerc'hez, me gouez d'ann daoulin
Dirak ho madelez ;
Skei a rann var va feultrin,
Grit ma kavinn truez.
Pa zonzann 'vezinn barnet,
Va c'haloun ia bihan,
Rak aoun am euz da glevet :
Daoned oud, kerz d'ann tan !

Sujidi ha rouanez,
Tud dizesk, tud gouiziek,
Tud paour ha tud a zanvez,
Ar barner, ar belek,
Dirak tribunal Jezuz
Peb hini iel d'he dro,
Hag eul lagad luc'heduz
Varnomp holl a baro.

Deiz a goler, a enkreiz,
Deiz ruz-glaou gant ann tan,
Deiz estlammuz, didruez,
Tad ar spount ar goelvan,
Deiz braz ar varn jeneral,
Petra harzo ouzid ?
Ennoud eo skrijuz sonjal...
Krenid, pec'her, krenit !

Re zister eo nerz eunn den
'Vit gellout lavaret
Ar c'hemmesk hag ann anken
A redo dre ar bed,
Pa vo digaset kelou,
Dre bep seurt goalinier,
E teu dervez ann Aotrou
Hag eo tost ar Barner.

Eunn den, guir vab d'ar pec'hed,
Trenk he deod gant ar gaou,
Eul leon, eunn tigr kounnaret,
Lemm-aotenn he skillou,
Ann Antekrist enn eur ger
(He hano 'ra skrija)
A zeuio tri bloaz hanter
Evit flastra peb tra.

Fall evel ann drouk-spered,
Betek mel he eskern,
E teui gant eur fals profet
Hag holl nerz ann ifern.
Kriz e vezo ar brezel
A rai d'ar gristenien,
Neuze klenvel ha mervel
A ve dous ha laouen.

Ar bleiz gouez, goulskoude,
Pa gav ann oanik paour,
Her samm, hel laz heb dale,
Hen debr var bord ann dour.
Ann Antekrist a lamo
Tamm-ha-tamm ar vuez,
Kant maro enn eur maro
A roio dre hirnez.

Nebeudik a dud fidel
Dirak ar bourreo kriz,
Dirak ann tan, ar gountell,
'Chellfe miret ho feiz.
Mes enep ann enebour
E teui daou brofet braz
A berz Jezuz d'ho zikour :
Enok hag Eliaz.

Guelet e vezo neuze
Enn eac'h, var ann douar,
Peb tra da venji Doue
O vonet e kounnar ;
Ar c'hurunou a bigno
Var gein ar c'hoummoul du,
Tan glaz tro-var-dro d'ezho,
Da gas tout e ludu.

Ar mor braz eat digompez
Dindan nerz ann avel,
A stlapo spount he vouez
Dre 'r vro a-bell a-bell.
Krozal rai enn he goler,
Birvi, eonenna...
Torraad, kerrek ha reier,
Prest eo d'ho pruzuna.

Savel, evel menezioù,
Betek barr ann ear
E tilammo ann tarziou
Da lounka ann douar.
Ar sterioù a gav d'ezho
E teu eunn eil dour-beuz,
En em c'houeza reont dillo...
N'euz nemed brasoc'h freuz.

Ann douar gant ann derzienn
A gren he izili,
Gourdrouz 'ra betek kreizenn
Frailla ha digeri ;
Ar c'hrenva kearioù brezel
A velann holl e kaon
Hag ar menezioù huel
A ruill ho fenn d'ann traon.

Tud keiz, da glask ho puez
Pe leac'h ve mad tec'het ?
Gant ann ankou didruez
Allaz ! c'houi zo kelc'het.
Ma'z it e kleuz ann dorgenn
Draillet oc'h gant ar vein,
Ma chomit enn ho lochenn
Koueza 'rai var ho kein.

Enn Env, ann denvalijenn
Noz ouz noz a stago,
Ann heol zo eur c'houlouenn
Mouget evit atao ;
Al loar a c'houezi goad,
Ar stered o koueza,
Ann Envoù oc'h horjellat
A c'hourdrouz holl freuza.

Allaz ! me glev o sini
Glaz estlammuz ar bed,
Ann dud veo enn angouni
Gant ar spount zo kouezet.
Ann douar en em zigor
O strinka tan bep tu,
Ha n'eo mui nemed eur mor
Leun a voagou tan ru.

Ouspenn, ha prim ha dillo
 Ann Env vo entanet ;
 Dre'r firmamant ne redo
 Nemed tan ha luc'hed :
 Tan enn traon, tan enn ear,
 Ar bed holl zo e tan...
 Ema gant ann douar,
 Marv' mik eo peb unan.

15

VAR AR MARO.

*peur chante
(Bourdonnant)*

Mab den, sonjit enn hoc'h heur diveza
 Ma vezo red da viken finveza
 Gant ho puez, ho pinvidigeziou,
 Ho kloar dister, ho plijadureziou.

Ann Doue braz, barner eveuz ar bed,
 Ar re veo en deuz holl koundaonet
 Eur vech hebken da c'houzanv ar maro...
 Lakit evez ha diouallit atao.

Ar maro kriz gant he falc'h diremed,
 Gant he virou lemmoc'h evit luc'hed,
 Biskoaz morse ne bardounaz da zen
 Nag, a dra zur, ne bardouno biken.

Kerkouls ez a da lez ar rouaned
 Ha d'ann ti paour euz ar baizanted,
 N'en deveuz aoun rak na braz na bihan
 Dre ma'z eo mest eveuz ann holl bed-man.

Ar maro kriz a vale diarc'henn,
 Heb trouz ebet e teu betek ann den ;

Mud ha bouzar ne ra van deuz klemmou,
 Deuz iaouankiz, nerz, gened na madou.

Tud guenn ho pleo, m'oc'h euz eunn tamm furnez,
 Grit pinijenn ar rest euz ho puez ;
 C'houi, tud iaouank, mirit lezenn Doue,
 Araok varc'hoaz c'houi varvo marteze.

16

VAR AR MARO.

Selaouit, ma Jezuz, selaouit ouz ma fedenn,
 Ar maro zo spountuz, em maro deut d'am difenn.

Diskan.

Guerc'hez Vari, va mamm leun a drue,
 Em maro, gant Jezuz, roit sikour d'am ene.

Pa zeui spes ar maro da spounta va daoulagad,
 Diskouezit d'inn, Jezuz, bizach ha kaloun eunn tad.

Pa zeui c'houezenn ma zal ha ma diou jod dislivet
 D'ober heuz d'ar re all, c'houi, ma Jezuz, tostaet.

Pa n'hellinn ket klevet komzou ann dud, ma Zalver,
 Komzit c'houi d'am c'haloun gant ho mouez dous ha tener.

'Vit ar vech diveza pa larinn : Jezuz ! Jezuz !
 Klevit, o ma Zalver, ouz ho pugel truezuz.

Pa gouezo ann daelou diouz ma lagad o vervel,
 Bennigit-hi, Jezuz, grit ma vint daelou santel.

O Jezuz, pa velot ma c'haloun baour o ranna,
 Var ma foan, ma anken, skuillit eur beradik joa.

Pa vo red d'inn kuitaat traou ar bed evit james,
 Bezit, c'houi, ma Jezuz, ma mad, ma finvidigez.

P'en em zispartio eveuz va c'horf va ene,
 Resevit, va Jezuz, ann ofrans euz va bue.

Enn ho pardedigez pa vezinn, o va Jezuz,
Bezit dous em c'hever, roit d'inn ar vuez euruz.

Me laka va fedenn, va buez ha va maro,
Etre daouarn Jezuz ha Rouanez ann envo.

17

GUERZ AR GARNEL.

Deomp d'ar garnel, kristenien, guelomp ar relegou
Euz hor breudeur, c'hoarezed, hon tadou, hor mammou,
Demeuz hon amezeien, hor brassa mignouned,
Guelomp ar stad truezuz m'emaint ennhan rentet.

Kavout a reot anezho torret ha bruzunet,
Ha zoken ann darn vuia e poultr a zo kouezet;
Ne veler mui ho noblans, ho gened, ho danvez...
N'euz hano euz ann traou-ze e douar ien ar bez.

Ar paour hag ar pinvidik, ar mestr hag ar mevell,
Guech all kemm braz etrezho, a zo brema henvel;
Ne d-euz mui nemed eskern, poultr ha breinadurez,
Spountet eo va daoulagad, teuzi 'reont gant truez.

Hogen. er stad truezuz, m'emaint ennhan rentet,
E komzont, hag ho c'homz mud zo helavar meurbed;
Ouz peb unan e pregont, mar karomp profita,
Dre ma plijo gant Doue hon lezel er bed-ma.

« Ni zo bet var ann douar o ren kerkoulz ha c'houi,
O tiviz hag o vale, oc'h eva, o tibri;
Ha setu ama brema ar stad ma'z oump rentet
Goude m'oump bet enn douar o vezur ar prenvad.

« Me oa eunn den krenv ha koant, ha me eunn dijentil,
Me oa eun den pinvidik, ha me eun den habil;
Me'm euz kollet va noblans, ha me va holl danvez,
Me va nerz ha va gened, ha me va gouiziegez.

« N'on deuz kavet nemedomp hag hon oberiou mad,
Da ginniga d'hor Barner, d'hor Roue ha d'hon Tad;
List 'ta madou ann douar grit brezel d'ar visou....
Dizale c'houi 'vo poultrenn evel ni er beziou. »

18

PEGER BERR EO AR VUEZ.

TREMEN 'RA PEB TRA.

TON NEVEZ.

Selaou, va breur ker,

Buhan ia ann amzer,

Tremen 'ra peb tra;

Nerz, madou, iec'hed.

Iaouankiz ha gened,

Tremen 'ra peb tra. (bis)

Skeuden da vuez

Eo al lestr a velezh,

Tremen 'ra peb tra;

He roudou er mor

Zo kloz a veac'h digor,

Tremen 'ra peb tra. (bis)

Deiziu presiu,

Grasou guella Jezuz,

Tremen 'ra peb tra;

Eur vech tremenet

Enn dro ne zeuont ket,

Tremen 'ra peb tra. (bis)

Tud skanv ha distur
A glask ar blijadur,
Tremen 'ra peb tra ;
Fenoz o fringal
Varc'hoaz er bez tenval,
Tremen 'ra peb tra. (bis)

Tud devot tentet,
Kaloun ne gollit ket,
Tremen 'ra peb tra ;
Fin vo d'ar brezel,
C'houi gavo peoc'h santel,
Tremen 'ra peb tra. (bis)

Berr eo peb dervez
N'eo ket hir ar vuez,
Tremen 'ra peb tra ;
Klaskomp heb dale
Savetei hon ene,
Tremen 'ra peb tra. (bis)

Kant vloaz ha mil bloaz
A ve disterik c'hoaz,
Tremen 'ra peb tra ;
Nemed c'hoüi, Doue,
Hag ann eternite,
Ann eternite ! (bis)

ANN IFERN.

Diskennomp holl, kristenien, enn ifern da velet
Doare trist, estlammuz, ann eneoü daonet
Zo eno, dre vir Doue, dalc'het ebarz enn tan,
O veza great goall zispign euz he c'hras er bed-man.

Ann ifern zo eunn toull doun, leun a denvalijenn,
El leac'h na veler morse 'r bihana sklerijenn ;
Ann doriou zo bet serret ha prennnet gant Doue,
Ha n'o digorro biken : kollet eo ann alc'houe.

Eur fourn c'horet er bed-ma ne d-eo nemed moged
E kever tan ann ifern, tan eneoü daonet :
Guell e ve devi ennhi ac'hann da fin ar bed
Eget beza enn ifern epad eunn heur dalc'het.

Iudal a reont a bouez penn, evel chas kounnaret,
Ne c'houzont pe leac'h tec'het, e peb leac'h int lesket :
Ann tan zo var ho gorre, ann tan zo dindanho,
Ann tan zo a bep kostez hag ho devo ato.

Ar mab a lamm gant he dad, hag ar verc'h gant he mamm
D'ho stleja gant mil malloz dre ho bleo 'kreiz ar flamm :
Malloz d'ehoc'h, greg diaked, hag oc'h euz hor ganet !
Malloz d'ehoc'h, tad didalvez, kiriek oc'h oump kollet !

Ho magadurez a vo da viken gant Satan,
Ann hirvoud, ann dizesper, etouez ar goaziu tan,
Hag ho evach, ho daelou... beradik dour ebed
'Vit ho muzellou disliv pe glaz gant ar zec'hed.

Ha kignet vo ho c'hroc'henn hag ho c'hig difreuzet
Gant beg ann aered-viber ha dent ann diaouled ;
Hag enn tan e vo ruillet ho c'hig hag ho eskern,
Evit ma tevo krenvoc'h forn skrijuz ann ifern.

Goude ma vezint lesket eur pennadik enn tan,
E vint taolet enn eul lenn leun a skourn gant Satan,
Hag euz all lenn 'barz enn tan adarre vint taolet
Hag euz ann tan 'barz an dour'vel eul loc'h-houarn goeliet.

Neuze 'teuint da vouela, da vouela gant enkreuz :
O pet ouzomp, ma Doue, o pet ouzomp truez !
Hogen enn aner 'vouelint, rak tra bado Doue,
E pado ho ankeniou hag ho enkreuz ive.

Ken tear e vezo ann tan ho lesko enn ifern
Ma teui ar mel da virvi penn-da-benn ho eskern ;
Petra dal goulenn truez, n'euz mui truez ebed,
Kaer o devezo iudal, lesket e vint bepred.

Ann tan-ze a zo c'houezet dre vuhanegz Doue,
Ne gollo ket euz he nerz hed ann eternite ;
Biken na daolo moged, ha biken na zevo,
Heb ehana d'ho leski biken n'o distrujo.

20

VAR AR PURKATOR.

Allaz ! na c'houfe den koumpren
Pegen estlamm eo hon anken !
Hor pinijenn a zo kalet...
Enn han' Doue, hor zikouret !

Diskan.

Breudeur, kerent ha mignoured,
Enn han' Doue hor zelaouet,
Enn han' Doue, hor zikouret !

A bep tu d'eomp n'euz nemed tan,
Tan var c'horre ha tan dindan :
C'houi on euz-ni kement karet,
Enn han' Doue, hor zikouret !

Sonjit enn ho tad, enn ho mamm,
Er purkator e kreiz ar flamm :
Va mab, va merc'h, ah ! selaouet...
Enn han' Doue, hor zikouret !

Ni n'hellomp dre hor pedennou
Distan na berraat hor poaniou,
Doue ouzomp ne zelaou ket,
Enn han' Doue, hor zikouret !

Da gountanti justis Doue
Evidomp ah ! pedit bemde,
Dre aluzenn, mar hor c'haret,
Enn han' Doue, hor zikouret !

Kalz a c'hellit dre ho poaniou
Ho iuniou hag offerennou ;
Ken didruez na vezit ket,
Enn han' Doue, hor zikouret !

Ha pa vimp-ni e gloar Doue
Evidoc'h ni bedo ive,
Ouzomp eta holl selaouet,
Enn han' Doue, hor zikouret !

21

HUANADOU AR PEC'HER.

A-vihanik am euz pec'het
Hag offanset va Doue,
Va ene paour am euz lazet,
Ah ! pebez malheur d'inn-me.

Piou a jencho va daoulagad
E diou feunteun a zaelou,
Va daelou e daelou goad,
Evit gouela va c'hollou !

Ia, evit eunn netra, siouaz !
Me am euz sakrifiet
Madou ha n'o doa biskoaz
Ho friz etouez traou ar bed.

Kouls zo bet e oann meurbed ker
Da dri fersoun ann Dreinded :
Mes brema dizemt ha pec'her
Da Zatan me zo guerzet.

Perak n'eo ket deuet, heb damant,
 Ar maro kriz d'am gervel
 Divar mean-fount va badiziant
 Pe maillurou va c'havell ?

Neuze da vihana, va Doue,
 N'em bije ket bet tennet
 Koler va Mestr ha va Roue,
 Siouaz ! evel em euz gret.

Mignouned treitour d'am ene,
 Va enebourien touet,
 Nag a c'hlac'har a goust d'inn-me
 Ho peza anavezet !

Pardounet oc'h euz da zant Per
 Hag ivez d'ar Vadalen :
 Pardounit d'inn, o va Zalver,
 N'hoc'h offansinn mui biken.

22

MISERERE MEI.

TON NEVEZ : *Plac'hik enez Eusa.*

Pec'het em euz ha kalz pec'het,
 Truez, va Doue benniget ! (*bis*)

Hervez ho prasa madelez
 Euz eur pec'her o pet truez !

Eat ounn er fank ha doun, siouaz !
 Va goalc'hit ha va goalc'hit c'hoaz.

Noz ha deiz, a dreuz va daelou,
 Me vel skeud trist va fec'hejou.

Dirazhoc'h em euz faziet,
 Ma teuit d'am barn, emañ kollet.

Edon pec'her a veac'h great den,
 Ha p'oa va mamm ouz va dougen.

Ha va-unan me zo bet fall,
 E kreiz ann deiz ez ounn bet dall.

List da goueza var va ene
 Eur beradik dour euz ann Ee.

Neuze me vezo a nevez
 Guennoc'h eged erc'h ar menez.

Neuze va eskern dizec'het
 O devezo nerz ha iec'hed.

Taolit va fec'hejou er mor,
 Anezho kollit peb envor.

N'am stlapit ket a bell-a-bell,
 Mes roit d'inn ho Spered-Santel.

Neuze me zesko d'ar pec'her
 Pegen mad oc'h enn hor c'henver.

Tremenet va foaniou c'houero,
 Dirak ann holl me ho meulo.

23

VAR AR GONTRISION.

Doue, guir bried
 D'ann eneou,
 C'houi 'c'h euz va c'hrouet,
 C'houi 'c'h euz va frenet,
 C'houi 'c'h euz va c'hrouet
 'Vit ann envou.

Diskan :

Guerc'hez benniget,
Mamm druezuz,
Me am euz lazet
Dre veur a bec'hed,
Me am euz lazet
Ho mab Jezuz.

Abaone pell amzer,
Kovez 'rann ouzhoc'h,
Ez oun, va Zalver,
Siouaz ! eur pec'her,
Ez ounn, va Zalver,
Enebour d'ehoc'h.

Allaz ! me zo bet
Bete vreman
Kalz re aheurtet
Ebarz em fec'hed,
Kalz re aheurtet,
Chench a rankann.

Pignomp, va ene,
Var ar C'halvar,
Guelomp eunn Doue
Leun a garante,
Guelomp eunn Doue
Enn he c'blac'har.

He dreid zo griet
Gant ann tachou,
He gorf dispennet,
He benn kurunet,
He gorf dispennet
Gant ar fouetou.

Guel-hen divisket,
Savet er groaz
He zaouarn staget,
He gostez toullet,
He zaouarn staget
Gant tachou braz.

Me eo, va Doue,
Me va-unan
Em euz heb true
Dre va goall vue,
Em euz heb true,
Kresket ho poan.

C'houi a zo bepred
Eur guir Zalver,
Na c'houlennit ket
E ve den kollet,
Na c'houlennit ket
Koll ar pec'her.

D'ho treid e pokann
Gant Madalen,
Re e taleann,
Re bell e kasann,
Re e taleann
Va finijenn.

Gened koz bepred,
Bepred nevez,
Poent eo ho karet,
Salver benniget,
Poent eo ho kare
E guirionez.

24

AR PEC'HER E TAL AR GROAZ

TON ANAVEZET.

E tal ho kroaz, leun a anken,
Goude ker braz pec'hejou ;
Ho treid evel ar Vadalen
A voalc'hann gant va daelou ;
Jezuz, Jezuz,
Daoust d'am buez nebeut kristen,
Pardoun, pardoun, va Jezuz !

Guir eo, me n'em euz meritet
Nemed droulanz va Barner,
Mes eur goad divin a zired
Euz pemp gouli va Zalver :
Jezuz, Jezuz,

Mil ha mil oc'h euz pardounnet,
Pardoun, pardoun, va Jezuz !

Pa'z oun dinerz ha ken toc'hor,
Pa'z ounn evel eur c'hlanvour,
Enn ho kostez ruz ha digor
Ra kavinn nerz ha sikour :
Jezuz, Jezuz,

C'houi vezo pelloc'h va zenzor,
Pardoun, pardoun, va Jezuz !

Sellit : redet a ra va daelou,
E kaon ema va c'halon,
Kreskit c'hoaz, Tad ann holl grasou,
Eur c'heuz ker mad evidon :
Jezuz, Jezuz,

Renons a rann d'am pec'hejou,
Pardoun, pardoun, va Jezuz !

25

GUERZ AR VEZVENTI.

TON NEVEZ : *Ar chouanted.*

A benn nebeut bloaveziou, var douar Breiz-Izel,
Me gred a vezo roued ann dud fur ha santel ;
Ar vezventi milliget a ia var gresk atao,
Prest n'or bezo ken Doue nemed ar bod illio.

Diskan :

O va Jezuz benniget, p'edoc'h stag ouz ar groaz,
C'houi c'heuz epad hirr amzer gouzanvet sec'het braz :
Dre ar guin trenk ha c'houero a oue d'eoc'h kinniget,
Diouz pec'hed ar vezventi va diuallit bepred.

Ann dud zo brema, siouaz ! n'ouzont ober netra,
Heb ar verenn dirazho, heb eva hag eva ;
Er marc'hajou, er foariou, da zul ha da bemdez,
Ema ar guin o redet founnuz hag heb paouez.

Sellit ouz all labourer pe ouz ar micherour,
Evit terri ho zec'hed ne d-eont mui d'ar pod dour,
Kaout a reont ive divlaz ar guin pe ruz pe venn,
Tan a rankont da lounka, tan guisket e melen.

Kalz tud koz a ro goall skouer, kalz pennou-tiegez
Ne reont van 'vit ankenia bugale ha gragez ;
Dirak guer ha boutaillou e chomint da c'hlaouri
Pa skuiller daelou c'houero var oaled ien ho zi.

Kartou ha dominoiou a zo prest var ann daol,
Setu digor ar c'hoari, ha guin ardant bep taol ;
Ar gounid zo d'ann hostiz, ma'z euz gounidegez
O terc'hel dor ann ifern dibrenn ha dialc'houez.

Tud iauouank ha merc'hejou, ouspenn enn eur barrez,
A ia d'ar guin, d'ar c'hafe, daou ha daou aliez :
Red eo ruzia evit'ho, rak hi ne ruziont ket,
Enn eur eva banneou, peb mez o deuz evet.

D'ar morlarjez, d'ar peurzourn ha pa vez eureujou,
A veac'h ma vez respetet oad ar vugaligou,
Ennho enn despet dez'ho e vezo plantet guin,
Ha pa c'heller ho mezvi ne reer nemet c'hoarzin.

Setu eno, kristenien, stad truezuz hor bro,
Ar vezventi evidomp eo feunteun ar maro,
En em vezvi hoc'h-unan ha mezvi ar re all,
Setu enn'ho, Bretounet, ho pec'hed kapital.

Doue enn he vadelez a reaz ar vinienn
Evit rei nerz d'hor c'haloun hag he renta laouen,
Etre kerent, mignouned, eur bann zo iac'huz,
Mes d'ar guin deomp goustadik dre ma'z eo goal-nerzuz.

Taolit, taolit mad evez, beillit enn han' Doue,
Neo ket diez en em voaza dreist holl diouz ann traou kre.
Eur vech m'o po kemeret eur pleg ken divalo,
Satan ho kaso ker pell ma na gavfot distro.

Ma tremen ar vezventi treujou eunn tiegez,
Eno n'euz mui da c'hedal peoc'h vad na karantez ;
Eunn ozac'h eaz da garet, pa vez divar ann dour,
Divar ar guin zo eur bleiz a ra spount he c'hreg paour.

Ar re dechet da eva ne d-int mui kristenien,
C'hoant am be da lavaret ne d-int ket tud zoken,
Diskenn a reont izeloc'h eged ann aneval :
Al loan mud diouz re gofad a c'hoar en em ziuall.

Eul lestr karget a zanvez, ma teu da bensea,
Euz kement vad a zouge ne jom ganthan netra,
Ar mor, en eur c'hinaouad, a lounkaz tout a bez...
Ouz ar mor te zo henvel, mezventi didruez !

Abred te deu da lounka ann henor, ann danvez,
Ar feiz hag ann esperans, ar iec'hed, ar vuez,
Purete ha lealded, diouz ar mezvier diboell,
Evel labouset aounik a dec'h a denn-askell.

Pa vez ann teod entanet hag ar goad o virvi,
Pa vez Satan, ar muntret, o c'houeza kasouni,
Penaos etre mezvierien ne zigorfe brezel ?
Prestik eo savet ann dourn, ar vaz pe ar gountell.

Ar mezvier n'oar mui pedi : he holl litanion
Eo dibuna er vouillenn a bep seurt malloziou.
Tavomp... Doue gallouduz, c'houi vezo ar barner,
C'houi c'hoar pe leac'h enn ifern e kouezo ar mezvier.

26

ANN DIAOUL MUD.

Ton : Petra zo nevez e kear Iz.

Pa zaoulinomp evit koyez,
Hon enebour zo var evez,
Ema tostik er c'hostez kleiz,
Dionallit..., braz eo he valiz.

Hanvet eo bet ann Diaoul mud,
N'e ket heb guir en deuz goall vrud ;
Ifernia 'reaz kalz tud, siouaz !
Ha kalz re all a gollo c'hoaz.

Derc'hel kloz ginou ar pec'her,
Setu eno he holl vicher ;
Keit ha ma nac'her ar pec'hed
Her gout a ra : pardoun ebed.

Kaer o pefa iun ha lenva
Ha lavaret *med culpâ* :

Pec'hed a guzer er galoun
Biken n'en devezo pardoun.

Great o pe, siouaz ! kant torfed,
Mar kovesait, oc'h pardounet :
Grit eur pec'hed marvel hebken,
Mar hen nac'hit, pardoun biken.

Euz eur remed a ro pare
E rit eur poezoun d'hoc'h ene,
Hag e kreiz feunteun ar vuez
E kavfot maro didruez.

It, a lavar ar c'honfesor,
Ann env zo brema d'ehoc'h digor.
Allaz ! d'ann ampoent dourn Doue
A zo o serra dor ann Ee.

P'oc'h deuet da govez, hoc'h El-mad
A ioa oc'h en em laouenaat :
Diouzhoc'h, great ho sakrillac,
Trist-holl e tistro he vizach.

Ann Diaoul a ioa bet nec'het
Gant aoun na rankje kuit tec'het ;
Mes ema brema adarre
Lojet brao-braz enn hoc'h ene.

Gant ho teod gaouiad ar poezoun
A zo kuzet enn ho kaloun ;
Ha, siouaz d'eoc'h ! bete 'r maro
Kuzet ha kuzet e chomo.

Ann Diaoul mud gant he ardou
A zalc'ho serret ho kinou,
Ha rentet mud enn ho puez
C'houi varvo mud..., taolit evez !

27

GUERZ AR ZUL.

TON NEVEZ : *Peterined Itron Varia Guengamp.*

Dalc'hit sonj mad, kristenien, ez euz eunn deiz santel
A deu dre zoun ar c'hleier, bep sizun, d'hor gervel
Da vont d'ann iliz parrez 'vit meuli hon Aoutrou,
Ha goulenn grasou nevez eharz ann aoteriou.

Ann deiz-ze zo benniget, sakr eo dreist ar re all,
Neb a zeui d'he brofani ne vo ket didamall.
C'houec'h dervez zo d'al labour, unan zo d'ann ene,
Ann den en deuz c'houec'h dervez, ar zul zo da Zoue.

Gant glac'har hel lavarann, var meur a zigarez,
Kalz tud a zisprij Doue hag a glask he laerez.
Var vor kouls ha var zouar ez euz meur a hini
N'ouzont mui nag ehana, na senti, ha pedi.

Var ho meno int furoc'h eget Krouer peb tra,
Hag enn despet d'he lezenn e klaskont kaout bara :
Tud keiz, selaouit hirio levr kaer ann Aviel,
Jezuz vo ar prezeger, selaouit e gentel :

« Ne vezit ket var enkreiz ha na livirit ket :
Petra gavinn da zibri, penaoz vezinn guisket ?
Ann Tad oc'h euz enn envou zo sklear he zaoulagad,
Hen 'roi d'he zervicherien ha boued ha dillad.

« Sellit ouz ann eunigou a nij azioc'h ho penn,
N'ouzont ada, na medi, n'o deuz ket eur c'hreunen,
Kaout a reont, dre c'hras Doue, peb dervez ho begad :
Bevit eta gant fizians e madelez ho Tad.

« Sellit ouz ar bokedou a zav ker stank er prat,
Biskoaz n'o deuz bet desket na neza, na griat ;
Ha goulskoude Salomon, varnhan he vantell aour,
E skoaz eur bodik lili a ioa c'hoaz guisket paour.

« Ma'z eo livet ker koantik ar bleuniou-ze dister,
En em zigor da vintin hag a vo seac'h em berr,
Livirit d'inn, tud difeiz, penaoz c'hellfe Doue
Lezel noaz ha divoued ann dud he vugale ?

« Klaskit gounit da genta rouantelez ann ee,
Var hent ar goure'hemennou na skuizit o vale :
D'ehoc'h 'vezo ar baradoz, ha zoken er bed-ma
Digant ho tad c'houi pezo ha dillad ha bara. »

Setu komzou hor Zalver, krenv int ha dizolo ;
Goulskoude meur a hini a jomo pounner-gleo ;
C'hui dreist holl, tud divezet, a veler peurvuia
O rei ar zul d'al labour hag al lun d'ann eva.

Allaz ! pell zo ann douar a zo evel mouzet,
Ema ann despet d'ezhan o rei frouez hag ed : *o touger*
Goude kement labourat, ann eost a vez tano,
Ma na viromp ar zuliou, da baour ez ai hor bro.

Ia, sonjit mad, va breudeur, red eo bennoz Doue
Varnomp ha var hor chatal, var hor meaziou ive : *hol-bened*
Bep sul, gant devosion, deomp eta d'ann iliz ; *parkeu*
Hag or bezo heol skeduz, glao pinvidik a gliz.

Hag or bezo baradoz goude fin hor buez,
Hag e klevimp gant joa kantikou ann Elez : *me g'hoar*
Rag eur zul dreist peb hini eo an eternite, *maest' d'ur vobion*
Eunn iliz dreist peb iliz eo palez kaer Doue.

28

KANTIK FIN AR MISION.

Kavet em euz ar peoc'h hag ann euruzded,
Iac'h eo brema ha laouen va ene,
Dindan va zreid ann ifern a zo klozet,
Dreist ann oabl glaz me vel digor ann ee.

Diskan.

O va Zalver, hirio, varc'hoaz ha bemdez,
Ra vo meulet hoc'h hano dudiuz !
Er mision em euz kavet ar vuez...
Bennoz, bennoz, mil bennoz d'ehoc'h, Jezuz ! *(bis.)*

Em goazied e red freskoc'h ar goad,
Ne grenann mui terzienn ar goall dechou,
Va c'haloun baour ennon zo iaouankeat,
Deuet euz d'inn nerz da garet ann Aotrou.

Pegen dous eo tanva ar guir garantez,
Meuli Doue, hor C'hrouer hag hon Tad !
Anaout, karet, setu bonheur ann Elez,
Setu ive bonheur ar c'hristen mad.

Diouz ar pec'hed e kimiadann da-viken,
Ne fell mui d'inn hada danvez daelou.
Var ann hent fall ne gaver nemed anken,
He letoun flour a zev evel ar glao.

Ia, pec'herien, ho plijadur zo c'houero,
Ha pebez spount pa vezo red mervel !
Sonjit ervad, epad m'az oc'h c'hoaz beo :
Plijadur verr a deñn poan eternal.

Re zivezad em euz hoc'h anavezet,
O va Doue, ruzia ' rann gant ar vez.
Re bell siouaz ! ez ounn bet d'ann drouk-spered,
D'ar spered louz, d'ar muntrer didruez.

Hiviziken va ene ha va c'halon
Ne glaskint kaout nemet c'houi da Aotrou,
Va c'horf ive, keit ma vezo ac'hanon,
A vezo d'ehoc'h gant he holl skianchou.

Her gout a rann, bresk ounn evel eur gorzenn,
Eunn netraik a rafe d'inn terri ;
Ar berad gliz o krena var ann delienn
Ne gouezfe ket buhanoc'h 'barz er pri.

Mar d-ounn heb nerz, dispoint ounn evelato,
 Gant gras Doue n'em euz aoun rak netra :
 Ar gorzennik, p'en em stag ouz ann dero,
 Zo diouallet enn tourmant ar brassa.

Ouzhoc'h, Jezuz, hag ouzhoc'h ive, Guerc'hez,
 En em stagann evit kaout ar goasked.
 Plijet ganehoc'h harpa va zempladurez
 Ha va diouall dre ho skeud benpiget.

Pe guelloc'h c'hoaz, Jezuz, ar guir vinienn,
 Ra'm bezo perz enn ho puez divin,
 Neuze kaereat dre ar vertuziou kristen
 Me vo eur bod goloet a rezin.

Kourach ! kourach ! eur Baradoz da c'hounit
 A dle lakaat ho c'haloun da zridal.
 Kourach ! kourach ! poanit stard ha labourit,
 Eur gurunenn zo du-hont ouz ho kedal.

ANN ENE DEVOT DA JEZUZ.

TON ANAVEZET.

Va Jezuz, va Doue, c'houi hebken a zezirann,
 C'houi eo va c'harantez, ennhoc'h-hu ec'h esperann.

Diskan.

O va Jezuz, o va c'harantez,
 Bezit em c'haloun ha bemnoz ha bemdez !

Va Jezuz, c'houi zo dous, c'houi a zo karantezuz,
 Va Jezuz, c'houi zo mad, c'houi a zo trugarezuz.

Bete vrema ounn bet siouaz ! en em abuzet
 Gant afferiou ar bed ha gant he vadou dallet.

Högen hirio, Jezuz, me a ro d'ehoc'h va ene,
 Va c'horf, va skianchou hag ar rest euz va bue.

Peger braz ez eo bet ho trugarez, va Aotrou,
 M'oc'h euz prizet dougen ar beac'h euz va fec'hejou.

Ah ! pebez karantez oc'h euz bet enn hon andred,
 Da veza evidon eur maro kriz gouzanvet.

Pegen heuzuz eta, pegen drouk eo er pec'het,
 Pa en deuz ho lazet, va Redemptor benniget !

O pec'hed milliget, dont a rann d'az detesti
 Ha n'am bezo pelloc'h ouzid nemed kasouni.

Pegen glac'haret oun da veza bet offanset
 Eunn Doue zo ker mad, ken din da veza karet !

Dre ho kras, va Jezuz, me bromei en em viret,
 Ar rest euzva buez, dioc'h peb drouk, dioc'h peb pec'hed.

Sellit, o va Jezuz, a druez ouzinn breman,
 Va zikourit d'ober holl kement a brometann.

Kinnig a rann d'eoc'h va buez ha va maro,
 D'ho polontez santel me fell d'inn plega ato.

VAR AR GOMMUNION.

TON ANAVEZET.

Elez euz ar baradoz, sellit pebez henor
 A ra deomp er zakramant Jezuz, hon redemptor !
 Eur vech evit hor prena ez eo bet inkarnet,
 Hag evit dont d'hor maga, ganeomp e chom bepred.

Diskan.

Mari, guir vamm da Zoue, Mari, va mamm dener,
 Va zikourit da reseo ho Mab ha va Zalver :
 Me ne d-oun siouaz ! netra, netra nemed pec'hed,
 Mes ennhoc'h ec'h esperann, o va mamm benniget.

Krouer ann Env, ann douar, var ann aoter bemde
 Dre gomz nerzuz ar beleg a ziskenn euz ann Ee;
 Eunn Doue kalz hueloc'h eget ar firmamant, *en holl stered*
 En em izela dindan spesou ar zakramant.
 Eunn Doue ne jench jamez epad ann holl amzer,
 Eunn Doue var blad he zourn a zoug ar bed antier,
 En em lez dre ar beleg da veza diblaset
 Evit disken e kaloun ar paoura zo er bed.

O mirakl ar souezusa etre ar miraklou ! *brava*
 O burzud ne c'hell koumpren ar c'haera sperejou !
 Evit gounid kalounou ho pugale ingrat,
 Ho magit, o va Jezuz, gant ho korf hag ho koad.
 Nann, evit eur mab unik, ar vamm ann denera
 Biskoaz ne zantaz kement he c'haloun o tomma.
 Goude ker braz karantez, ah ! piou c'helfe refuz
 Konsakri he holl galoun d'ho karet, va Jezuz !

Mar d-eo dister kalounou ar Zent hag ann Elez
 Evit karet eunn Doue ken din a garantez,
 Penaoz e prizit, Jezuz, dre ar gommunion
 Euz kalounou ker sklaset dont da ober ho tron ?

Penaoz kredi azeza ouz taol sakr eunn Doue
 Goude beza offanset kement he vajeste ?
 D'ho taoulagat, va Zalver, na c'hellomp prezanti
 Nemed kalonou siouaz ! leun a ingraterei.

Goulzkoude, pa gommandij tostaat ouz ho panked,
 Dre eur gomz a drugarez effasit va fec'hed, *paradant*
 Teuzit sklaz hor c'halounou gant tan ho karantez,
 Neuze ni ho resevo gant joa ha santelez.

Prestit d'inn ho tiouaskel, va El-mad soursiuz
 Ma nijinn evel eur goulm etre divreac'h Jezuz :
 Ma roi dez'han va c'haloun, hen roi d'inn he hini,
 Eno me a repozo e peoc'h ha dizoursi.

31

VAR AR GOMMUNION.

TON ANAVEZET.

Deut oll ha deut gant fe,
 Deut d'ar banked presiuz ;
 Galvet oc'h gant Doue
 Da zibri ouz taol Jezuz.

Jezuz,
 Baradoz ann ene
 Eo chom ganehoc'h noz-de.

Ma c'hoantait danvez,
 Ama ema ann tenzor
 Hon rent e guirionez
 Pinvidikoc'h 'vit ar mor,

Jezuz,
 Perc'henn ann holl vadou
 Ha mestr ann holl grasou.

He gorf, goad hag ene,
 Ebarz en hosti kuzet,
 Gant he zivinite
 A zo var daol ar banked.

Jezuz,
 Biskoaz n'euz bet eunn tad
 Evel c'hui dous ha mad.

M'her guel var ann aoter,
 Devet gant ar garante,
 O c'hortoz ar pec'her
 Evit tomma he ene.

Jezuz,
 A c'houlenn hor c'halon
 Evit beza he dron.

Mes allaz ! o sonjal
Penaos em euz offanset
Eur mignoun ken leal
Hag ann tenera pried ;

Jezuz,
Em be c'hoant argila
Ha chom pell da lenva.

Nann, ne veritann ket,
M'hen anzaos gant guirionez,
Goude beza pec'het,
Dibri bara ann Elez.

Jezuz,
P'am galvit goulskoude
Me ia, o va Doue !

Guerc'hez, Sent hag Elez,
Deskit d'eomp ho kantikou
Ma 'c'h unanimp hor mouez
Da veuli hon Aotrou.

Jezuz,
A virit ann holl c'hloar
Enn Env hag enn douar.

Gloar, henor, karante
Enn tabernaklou santel
Da Jezuz, mab Doue,
Henor ha gloar eternal !

Jezuz,
Bezit dre holl meulet
Ha gant ann holl karet !

32

VAR AR GOMMUNION.

Diskan :

Deut, va Doue, deut da ren em c'halon,
Deut d'am mezur dre ar gommunion.

Va ene paour a zo ouz ho kortoz, va Zalver,
Evel eunn douar ien, skarnilet gant goall amzer.

Mar d-eo guir ho komzou, c'houi a vezo d'am ene
Ar glao dous a bardaez pe glizennik ar beure.

C'houi eo ar pastor mad, me ann danvad dianket ;
Edon preiz ar bleizi hag oc'h euz va diboaniet.

Mar d-oc'h ar medisin, me siouaz ! eo ar c'hlanvour :
Louzaouit ar gouliou great d'inn gant va enebour.

Medisin, pastor mad, n'e ket aoualc'h kement-se,
Bez' ez oc'h em c'henver eunn tad leun a garante.

Dre ma tostaas ouzhoc'h ha dre ma tomm va c'halon,
Hi lavar ez oc'h c'hoaz he fried hag he mignon.

Rak-se 'ta, va Jezuz, me zeu da glask ho panked,
'Vel ma red ar c'haro d'ar feunteun enn he zec'hed.

Siouaz ! piou ez ounn-me da vont davedhoc'h, Aotrou ?
C'hoant am be da bellaat, pa zonzann em fec'hejou.

Hogen c'houi hoc'h-unan a c'hourc'hemenn d'inn tostaat,
Livirit 'ta eur gomz hag en em gavinn e stad.

33

VAR AR GOMMUNION.

TON ANAVEZET.

Oh ! nag hirr eo ann noz ! Pegouls e teui ann de
Ma'z inn da zigemer Jezuz, va c'harante ?

Va c'horf, savomp pelloc'h, deomp da gavout Jezuz,
Me glev euz ma guele he vouez karantezuz.

Pegouls e vinn arru ? O hent, nag hirr oud-te !
Var lein ho tiouaskell, Eled, va dougit-me.

O ma c'halon, digor gant joa ha levene,
Guelet a rann erlin ti ha palez va Doue.

O iliz benniget, 'n em zigor, 'n em zigor,
Evit ma'z inn ennod da gavout va zenzor.

O tonet en ho ti, o Mestr euz ann holl bed,
M'ho salud, m'hoc'h ador a gorf hag a spered.

O Sperejou euruz, holl Zent ha Sentezed,
A zo enn dro d'am Doue, m'ho salud gant respet.

Tabernakl benniget, digor, digor difre,
Ma velinn va Jezuz, ma velinn va Doue.

Jezuz, m'hoc'h anavez, dre zaoulagad ar fe,
Evit va Mestr, va C'hrouer, va Zalver, va Doue.

Dispozit va c'halon d'ho reseo, va Doue,
Roit d'inn fe, esperans, kreskit va c'harante.

Deuit eta, ma holl vad, antreit em c'halon
Hag enghi, evit mad, diazezit ho tron.

54 AR PASK KENTA.

TON ANAVEZET.

JEZUZ.

Me'm euz preparet eur banked
Ar presiusa zo er bed,
Evit rei d'am holl bugale
Va c'horf, va goad ha va ene.

AR VUGALE.

C'houi zo meurbed, o va Jezuz,
Enn hor c'henver karantezuz,
Evit beza d'eomp preparet
Hirio ann deiz eur seurt banked.

JEZUZ.

Pell zo emaounn, ha deiz ha noz,
Enn tabernakl ouz ho kortoz ;
Mall braz am euz, bugaligou,
Da ziskenn enn ho kalounou.

AR VUGALE.

Allaz ! allaz ! ne gredomp ket
Mont d'ho reseo, Salver ar bed ;
C'houi zo ker braz ho santelez
Ha ni bec'haz ken aliez.

JEZUZ.

Mar emaoc'h e pec'hed marvel,
Na zeuit ket d'am banked santel,
Araok goalc'hi mad ho kaloun
E dour gallouduz ar pardoun.

AR VUGALE.

E sakramant ar Binijenn
Ni on euz bet ann absolvenn,
Ha redet o deuz hon daelou
Gant keuz guirion d'hor pec'hejou.

JEZUZ.

Deut prim eta, deut d'ar banked
Am euz evidoc'h preparet,
Tostait holl hag heb dale
Laouenaat a reot ho Toue.

AR VUGALE.

Pa'z ounp galvet gant hor Zalver
Ni dostaio ouz ann aoter,
N'en deuz ar c'haro c'hoant ker braz
Da redet d'ar feunteuniou glaz.

JEZUZ.

Abarz dont da gommunia,
Goulennit pardoun da genta
Ouz kement oc'h euz offanset,
Dreist holl ho tad, ho mamm garet.

AR VUGALE.

Pardoun, va mamm, pardoun, va zad,
Me n'ounn ket bet eur bugel mad;
Hiviziken, dre c'hras Jezuz,
Me vo modest, dous ha sentuz.

JEZUZ.

Pardounit, tadou ha mammou,
Pardounit d'ho pugaligou,
Me o deuz muia offanset
Hag am euz d'ezho pardounet.

AR VUGALE.

O Tad eternal, va C'hrouer,
Hor c'hasit pelloc'h d'hor Zalver;
Mall eo, n'hellomp ket mui gortoz,
Roit d'eomp Jezuz pe varadoz.

Ha c'houi, Mari, ken truezuz,
Hor renit da vont da Jezuz,
Ma kavimp hirio ar vuez
E sakramant he garantez.

35 ENN HENOR D'AR GALOUN ZAKR.

O Kaloun zakr euz va Jezuz,
Kaloun meurbet karantezuz,
Plijet reseo, me ho suppli,
Ann desir a meuz d'ho meuli.

C'houi eo ar zoursenn presiuz
Euz ar grasou krenv a nerzuz
A resevann da bep mare
Hag a douch kement va ene.

O Kaloun sakr, c'houi zo eunn or
Hag a velann bepred digor
Da zigemer ar bec'herien
Pa fell d'he ober pinijenn.

Bet ounn siouaz ! o va Zalver,
Dianaoudek enn ho kenver.
Sellit ouz va ene ingrat,
Distrei a rann a galoun vad.

Torret am euz lezen Doue
Kant a kant mil guech em bue,
Muntrer ifam, pec'her divad,
Treuzet am euz kaloun va Zad.

Dirazhoc'h, Kaloun adorabl,
Me ra va amand henorabl;
Pardoun euz va zakrilachou,
Pardoun euz va holl fec'hejou !

Pardounit ivez ar c'hrimou,
Blasfemou, irreveransou,
Great bemdez gand ar baianed
Ha gant ann holl heretiked.

Mez siouaz ! d'eomp-ni kristenien
N'on euz bet nemed ienien
Evit karantez hor Zalver
Er zakramant euz ann aoter.

Stouet holl betek ann douar,
Hor c'haloun rannet gant glac'har,
Kriomp gant eur vouez truezuz :
Pardoun, pardoun, Kaloun Jezuz !

Pastor mad, c'houi oc'h euz klasket
Ann danvad a ioa dianket,
Setu hen o c'houlenn pardon,
Digorit d'ezhan ho Kalon.

Me garfe gant va goad goalc'hi
Va malis, va ingrateri,
Da vihana me ho gouelo
Betek ann eur euz va maro.

Ouspenn-ze enn hoc'h ilizou
Gant respet e rinn pedennou,
Ha gant eur guir devosion
Me ielo d'ar gommunion.

D'ann offerenn ez inn ive
Gant feiz ha gant humilite,
Offr a rinn eno d'ho justis
Ho Kaloun sakr e sakrifis.

Esper am euz da rapari
Va malis, va ingrateri,
Dre verit ho koad prezuz
Hag ho Kaloun karantezuz.

Kemerit ivez, evit kred,
Kaloun ho Mamm zo bet treuzet

Eharz ar groaz gant seiz kleze,
Dre ann nerz euz he c'harante.

Unanomp brema hor moueziou,
Leveromp dre hor c'hantikou :
Gloar d'ho Kaloun, Salver Jezuz !
Gloar d'ho Kaloun, Mamm druezuz !

MEULOMP HOLL.

TON ANAVEZET.

Diskan.

Meulomp holl da james)
Jezuz hag he vadelez !) *(bis.)*

Me ho meul, o va Jezuz !
C'houi oc'h euz va c'hrouet,
C'houi oc'h euz va frenet,
C'houi am mag, o va Jezuz !

Mil bennoz d'ehoc'h, o Jezuz !
C'houi a zo va fastor,
C'houi a zo va zenzor,
C'houi zo va holl vad, Jezuz !

Pardounit, o va Jezuz,
Va faotou tremenet,
Enn amzer da zonet
Me vo fidel d'ehoc'h, Jezuz !

Bennigit, o va Jezuz,
Va c'horf ha va ene,
Va mirit noz ha de
Euz a bep drouk, o Jezuz !

Hastit, hastit, o Jezuz !
 Terri va jadennou.
 Ah ! pegouls enn Envou
 Ho meulinn-me, o Jezuz ?

Ra vezo meulet Jezuz
 Dre holl da bep mare,
 Ni bemnoz ha bemde
 Meulomp holl, meulomp Jezuz !

37

HANO JEZUZ.

TON ANAVEZET.

Gloar da Jezuz ! A greiz kaloun me gano :
 Gloar da Jezuz ! meuleudi d'he hano !
 Hano karet, digaset euz ann Envou,
 Evel ar mel, ho kavann dous d'am ginou :
 Gloar da Jezuz !
 Gloar da Jezuz !

Gloar da Jezuz ! Jezuz, hoc'h hano divin
 Var va ene eo glizenn ar mintin ;
 Bokedik paour neuze me c'hoar digeri,
 Arc'hantet-holl ha laouen 'vel al lili :
 Gloar da Jezuz !
 Gloar da Jezuz !

Gloar da Jezuz ! Var va c'haloun enn anken
 Hano Jezuz eo ar guella louzaouenn ;
 Sklerijenn bur hag eur peoc'h leun a zouder
 A zeu ennon gant hano dous va Zalver :
 Gloar da Jezuz !
 Gloar da Jezuz !

Gloar da Jezuz ! Jezuz, hoc'h hano santel
 Zo nerzusoc'h 'vit mil den a vrezel ;
 Var ann douar, enn env, enn ifern douna,
 Hano Jezuz d'ann holl a ra daoulina :
 Gloar da Jezuz !
 Gloar da Jezuz !

Gloar da Jezuz ! He hano zo eur c'hleze
 Evit trec'hi enebour hon ene.
 Jezuz, Jezuz, a veac'h am euz ho kalvet,
 Divar va zro e red kuit ann drouk-spered :
 Gloar da Jezuz !
 Gloar da Jezuz !

Gloar da Jezuz ! Ia, gloar d'ezhan da viken,
 Er baradoz n'euz kaeroc'h kanaouenn :
 Ann Arc'helez, ar Zent holl, ar Zentezed,
 Stouet ho fenn, ne skuizont o lavaret :
 Gloar da Jezuz !
 Gloar da Jezuz !

Gloar da Jezuz ha gloar ive da Vari !
 Hanoiou sakr, d'ehoc'h ho taou meuleudi !
 Hed va buez, epad ann eternite,
 Bezit joa va c'haloun ha va ene :
 Gloar d'hor Zalver !
 Gloar d'hior Mamm ger !

38

KANTIK AR BARADOZ.

TON ANAVEZET.

Jezuz, peger vraz ve
 Plijadur ann ene,
 Pa vez e gras Doue
 Hag enn he garante. } (bis)

Berr 'kavann ann amzer
Hag ar poaniou dister,
O sonjal deiz ha noz
E gloar ar Baradoz.

Pa zellann enn Envo
Hag eirezek va bro,
Nijal di a garfenn
Evel eur goulmik venn.

Pa vo pred ar maro,
Neuze me gimiado
Diouz ar c'hig ankeniuz,
Enebour da Jezuz.

Gortoz a rann gant joa
Ann termen diveza,
Hast am euz da velet
Jezuz, va guir bried.

Kerkent ha ma vezo
Torret va jadenno,
M'en em zavo enn er
Evel eunn alc'houeder.

Tremen a rin al loar
Evit monet d'ar c'hloar,
Dreist ann heol, ar stered,
Me a vezo douget.

Eat pell diouz ann douar
Traonienn leun a c'hlac'har,
Neuze me rai eur zell
Ouz va bro Breiz-Izel.

Neuze me lavaro :
Kenavo d'id, va bro,

Kenavo, bed poaniuz,
Gant da bechou troumpluz !

Kenavo, paourente,
Kenavo, vanite,
Kenavo, trubuliu,
Kenavo, pec'hejou !

Pelloc'h na zoujinn ket
Ardou ann drouk-spered,
Biken m'en em gollo
Goude pred ar maro.

Goude pred ar maro
Gant joa me a gano :
Torret eo va jaden
Ha me libr da viken.

A bep tu pa zelinn
Kement tra a velinn
A rai d'am daoulagad
Ha d'am c'haloun mil vad.

Doriou ar Barados
Digor ouz va gortoz,
Ar Zent, ar Zentezed,
Prest d'am digemeret.

Me vo digemeret
E palez ann Dreinded,
E kreiz ann henoriou
Hag ar meuleudiou.

Me c'hello, evit mad,
Guelet Doue, ann Tad,
Gant he Vab eternal
Hag ar Spered-Santel.

Me a velo Jezuz,
Enn eur c'hiz dudiuz,
O lakat var va fenn
Ar gaera kurunenn.

Ho korfou evuruz,
A lavaro Jezuz,
Oa tenzoriou kuzet
Enn douar benniget.

C'houi zo em Baradoz,
Evel bokedou roz,
Divleuniet d'ar mare
Hag a vleun adarre.

Pegen douz vo klevet
Jezus o lavaret :
Deut, servicher fidel,
Deut d'ar c'hloar eternel.

Evit poaniou dister,
Evit ankeniou berr,
Me vezo paet mad
Gant Doue, var guir dad.

Kaer e vezo guele
Ar Verc'hez benniget
Gant daouzek steredenn
A ra he c'hurunenn.

Guele a rinn ouspenn,
Gantho peb a deleenn,
Ele hag Arc'hele
Holl o veuli Doue.

Guele a raimp-ni c'hoaz,
Leun a c'hloar, leun a c'hras,

Hon tado, hor mammo,
Hor breudeur, tud hor bro.

Guerc'hezed a bep oad,
Sentezed a bep stad,
Gragez, intanvezed,
Gant Doue kurunet.

Ann holl eledigou
Var ho askelligou
Ker mignon, kel laouen,
A nijo dreist hor penn.

Euruzded heb he far,
Sonjal ennhoc'h me gar,
C'houi ro nerz d'am c'halon
Pa gouez anken varnon.

Enn holl boaniou kalet
A gorf pe a spered,
Me zonjo deiz ha noz
E gloar ar Baradoz.

39
KROAZ AR MISION.

POANIOU JEZUZ VAR AR GROAZ.

TON ANAVEZET.

Diskan.

Meulomp, meulomp a vouez huel,) (bis.)
Jezuz hag he groaz santel !)

Ni ho salud, kroaz benniget,
Azioc'h hor penn nevez savet,

Ma talc'himp sonj, hed hor buez,
Euz bet mision er barrez.

Kalet ez eo kaloun ann den
A jom hirio sklaset ha ien,
A jom sklaset pa vel Jezuz
Enn eunn doare ken truezuz.

Betek ar maro e sentaz,
Betek ar maro var ar groaz,
Dournad plouz he vele kenta
Ha koat kalet he ziveza.

Mestr ann Env a zoug var he benn
Spern garo evit kurunenn,
Enn he dreid hag enn he zaouarn
Euz tachou braz great gant houarn.

He galoun baour a verv ennhan
Evel ar c'hoar dirak ann tann,
C'houi zo goasket, Salver divin,
Evel ma voasker ar rezin.

Ho nerz a red evel ann dour,
Ha digant den n'oc'h euz sikour ;
Enn ho sec'hed, netra, netra,
Nemed guin trenket da eva.

Eul laer a zeou, eul laer a gleiz,
Tro-var-dro enebourien kriz,
Hag, ar pezh a zo goasoc'h c'hoaz,
Ho Mamm dener e tal ar groaz.

Evet eo ar c'halir c'houero
A ioa ganthan blaz ar maro,
Jezuz, Jezuz a bleg he benn,
Tremen a ra... Prenet ann den !

Eur c'hleze lemm a zo eat doun
Enn he gostez bete 'r galoun,
Evit lakaat da zivera
Eur berad goad..., ann diveza.

Va Jezuz, araok m'az inn kuit,
Me a fell d'inn poket d'ho treid,
Me a stardo va muzellou
Ouz ar c'hoad sakr, ouz ann tachou.

Hirio, varc'hoaz, hed va buez,
Me vevo enn ho karantez.
Ma'm euz kaloun, pion a garfenn
Nemed Jezuz, Jezuz ebken !

hw KANTIK AL LABOURER DEVOT.

Ama pell diouz ann trouz
Hag holl savar ar bed,
Ar meziou am c'helenn kerkouls
Hag ann habila doktored.

Ann douar a fournis
Frouez nevez d'ar poaniour,
N'ho ro ket d'ar feneantiz,
N'euz ket a vloavez heb labour.

Me a vel ar guenan
Savet da c'houlou-de :
Me ivez a dle kemer poan
Da brofita euz graz Doue.

Ann dour-red heb ehan
A dreuz ar bokedou ;

Da Zoue mont prest a dleann
Heb luia er plijadurioù.
Eunn oanik gant fizians
A heul he c'houarnour :
Heul Jezuz eo va asurans,
Ann drouk-spered a zo treitour.

Ar guez braz enn avel
A bep tu zo fouetet,
Koueza 'rinn ma savann huel,
Suroc'h eo eur vertuz kuzet.

Ann deliou a jom fresk
Pa vent stag ouz ar guez ;
Evel deliou dinerz ha bresk
E kouezinn distag diouz Doue.

Ann ekleo, p'her galvan,
A gomz a douez ar guez ;
Doue am galv ha ne rann vann,
Evel bouzar ounn aliez.

Ar bokedou a zao
Hag e zec'h enn eunn de :
Allaz ! ne vevinn ket atao,
Me gouezo ivez heb dale.

Al laboused a gan
Meuleudi d'ho C'hrouer :
Me zo duoc'h eged ar vran,
Ma n'her meulann e peb amzer.

Guennaat a ra va bleo,
Enn erc'h ha frimm ar goanv ;
Va daouarn a skarr gant ar reo,
Mil guech goasoc'h a veritann.

Devet ounn gant ar c'hroez
Dindann ann heol d'ann hanv :
Tommder hag heol a zo traou ez
Ouz kroaz va Zalver pa zellann.

Holl evidoc'h eta,
Doue a garantez,
Poan, melkoni a joa,
Hirio hag epad va buez.

41 BENNOZ HA MALLOZ.

TON : *Les Breiz.*

Euruz ann hini a garo Doue
Euz he holl galoun hag he holl ene. (*bis*).

Ann den a blijjo da Zoue, hon Tad,
A zo diouallet ha diouallet mad.

Enn ti hag er park, enn deiz hag en noz,
Doue varnezhan a skuillo bennoz.

Ganthan he bried hag he vugale
O devezo perz e bennoz Doue.

Evel eur vezenn, douret he griziu,
E tougo frouez, deliou ha bleunioù.

Ma'z eo pinvidik, e rai vad d'ar paour,
He zourn a vo prest atao d'her zikour.

Ma n'en deuz danvez, en deuz kalz guelloc'h :
Eur galoun zo iac'h, chast ha leun a beoc'h.

Diouz c'houezenn he dal e tebr he vara,
Goude sin ar groaz heb klemm a netra.

Laouen ar vuez, laouen er maro,
Gant ann Elez mad d'ann Env e pigno.

Evidod, pec'her, n'ec'h euz da c'hedal
Nemed buez trenk hag eur maro fall.

Pec'her, deuz enn dro, deuz ha deuz buhan,
Rak ganez dija ema c'houez ann tan.

Kemer heb dale hent ar Baradoz,
Pe, m'hel lavar d'id, kaout a ri malloz.

EURUZ EO.

TON ANAVEZET.

Setu eiz kelennadurez
A ziskleriaz var ar menez
Jezuz, hor mestr selestiel,
D'ann Ebestel, d'ann Ebestel.

Euruz eo ar paour a galoun
Dre ma en deus eunn donezoun;
D'hezan eo ar rouantelezh
Euz ann Elez, euz ann Elez.

Euruz eo ar re zous ha mad
O pardouni a galoun vad,
Posedi a raint ann douar
Pel diouz glac'har, pel diouz glac'har.

Euruz ann nep a vouel bemde
Da veza offanset Doue,
Eun deiz e vezo konsolet
Heb mar ebet, heb mar ebet.

Euruz eo ann nep en deuz naouenn
Da rei da Zoue he galoun;
Karget e vezo he ene
Ebarz enn Env, ebarz enn Ee.

Euruz eo ar re druezuz
Enn andred holl vemprou Jezuz;
Roue ar bed en devezo
Truez outho, truez outho.

Euruz eo nep en deuz bepred
Eur galoun divlam, pur ha net;
Guelet a rai ebarz enn Ee
Ar guir Roue, ar guir Roue.

Euruz eo ar re pasifik,
Eun deiz e vezint pinvidik,
Galvet e vint ho pugale,
O va Doue, o va Doue!

Euruz nep a c'houzanv joaiuz
Dre abeg servicha Jezuz;
Monet a rai d'ar joauzded
Gant ann Eled, gant ann Eled.

KANTIK AR VERC'HEZ.

Magnificat * anima mea Dominum.
Et exultavit spiritus meus * in Deo salutari meo.
Quia respexit humilitatem ancillæ suæ, * ecce enim
ex hoc beatam me dicent omnes generationes.
Quia fecit mihi magna qui potens est, * et sanctum
nomen ejus.
Et misericordia ejus à progenie in progenies * ti-
mentibus eum.

Fecit potentiam in brachio suo; * dispersit superbos mente cordis sui.

Deposuit potentes de sede, * et exaltavit humiles.
Esurientes implevit bonis, * et divites dimisit inanes.
Suscepit Israël puerum suum, * recordatus misericordiae suae.

Sicut locutus est ad patres nostros, * Abraham et semini ejus in sæcula.

Gloria Patri, etc.

64 AVE MARIS STELLA.

Ave, maris stella,
Dei mater alma,
Atque semper virgo,
Felix coeli porta.

Sumens illud ave
Gabrielis ore,
Funda nos in pace,
Mutans Evæ nomen.

Solve vincla reis,
Profer lumen cæcis,
Mala nostra pelle,
Bona cuncta posce.

Monstra te esse matrem,
Sumat per te preces,
Qui pro nobis natus
Tulit esse tuus.

Virgo singularis,
Inter omnes mitis,
Nos culpis solutos
Mites fac et castos.

Vitam præsta puram,
Iter para tutum
Ut videntes Jesum,
Semper collætémur.

Sit laus Deo patri,
Summo Christo decus,
Spiritui-Sancto,
Tribus honor unus.

45 AR ROZERA.

CHAPELLED A JOA.

1. Sonjomp d'ar genta dizenez
Er joa e devoue ar Verc'hez
Pa oue gant ann El saludet
Da veza mamm Salver ar bed.
2. Enn eil mister sellomp Mari
O kuitaat he bro hag he zi
Evit guelet Elisabet
A zouge sant Iann benniget.
3. Enn trede mister hor Zalver
Zo ganet enn eur c'hraou dister,
Hag a lavar d'eomp distaga
Hor c'haloun diouz traou ar bed-ma.
4. Er pevare mister joaiuz
Ar Verc'hez gant he Mab Jezuz
En em offr enn templ evidomp,
Gantho da Zoue 'n em offromp.

M. L. G. G. G. G.

Harry

*Soe 'n em ginnigomp
Dit ana viji kinnigeb
De boue he Dad, kinnigeb ar bed.*

Christy

5. Er pemped mister ar Verc'hez
A gavaz goude tri devez
He Mab e kreiz ann doktored,
Leun a furnez hag a spered.

CHAPELED A GEUZ.

1. Ar c'henta mister truezuz
A ziskouez d'eomp glac'har Jezuz,
Beuzet enn eur c'houezenn a c'hoad
Ha stouet o pedi he Dad.
2. D'ann eil mister e oue freuzet
He gorf santel a daoliou fouet;
Evit ar pec'hejou mezuz
E c'houzanv eur boan ken euzuz.
3. D'ann trede e oue kurunet
He benn sakr, heb truez ebed,
Dre eur gurunenn great gant spenn,
D'hon dilivra leuz ann ifern.
4. Er pevare mister Jezuz
Dindan eur groaz pounner mezuz,
A gerz etrezek ar C'halvar;
Heuliomp-hen holl leun a c'hlac'har.
5. Er pemped mister Mab Doue
A ro evidomp he vue.
Piou a vezo c'hoaz ken ingrat
Da offansi Jezuz ker mad?

CHAPELED A C'HLOAR.

1. Er c'henta mister gloriuz,
Kanomp meuleudi da Jezuz :
Savet eo bet evez ar bez,
Hervez he gomz, goude tri dez.
2. Jezuz enn eil mister a c'hloar
A zeu da gutaat ann douar;
Sevel a ra d'ar baradoz,
Eno emañ ouz va gortoz.
3. Enn trede mister me a vel
O tiskenn var ann Ebestel
Ar Spered-Santel euz ann Ee,
Pehini hol rent tud neve.
4. D'ar pevare mister Mari
E kreiz ar joa, ar veuleudi,
Korf hag ene a zo douget
D'ar baradoz gant ann Eled.
5. D'ar pemped e oue kurunet
Mari, hor mamm, gant ann Dreinded :
Enn Env rouarez ann Ele
N'ankounao ket he bugale.

46 ANN AVE, MARIS STELLA. Henry 143

Ni ho salud, steredenn vor,
Mamm da Zoue, leun a henor,
Guerc'hez bepred, dor ann envou,
Selaouit ouz hor pedennou.

Resevit ar zalud santel,
E reaz d'ehoc'h ann El Gabriel,
Roit eur peoc'h ferm d'eomp er bed-ma,
O chench ann hano a Eva.

Torrit chadenn ar bec'herien,
D'ar re zo dall roit sklerijenn;
Pellait diouzomp peb drouk dalc'h-mad
Ha goulennit d'eomp peb seurt mad.

Diskouezit ez oc'h eur vamm vad
E kenver ann dud emzivad,
Grit m'hor selaouo ann hini
Oc'h euz ganet evidomp-ni.

Guerc'hez dispar e peb feson,
Dous dreist ann holl, pur a galon,
Euz hor pec'hejou dilivret,
Grit ma vimp dous ha chast bepred.

Grit ma vezo hor buez pur,
Preparit d'eomp ann hent asur,
Ma vezimp, o vetet Jezuz,
Eunn deiz ganehoc'h bepred euruz.

Gloar ato d'ann Tad Eternel,
D'ar Mab ha d'ar Spered-Santel;
D'ann tri fersoun euz ann Dreinded
Ar memes henor zo dleet.

ANN AVE MARIA. *Se Henry 340*

Ni ho salud, o leun a c'hras,
Ar zantela zo bet biskoaz,
Mari,
Ar zantela zo bet biskoaz.

Ganehoc'h bepred ema Doue
C'houi zo d'ezhan korf hag ene,
Mari,
C'houi zo d'ezhan korf hag ene.

Benniget dreist ann holl gragez,
C'houi zo mamm hag atao guerc'hez,
Mari,
C'houi zo mamm hag atao guerc'hez.

Benniget eo ivez Jezuz,
Ar frouez euz ho korf euruz,
Mari,
Ar frouez euz ho korf euruz.

Santez Mari, Mamm da Zoue,
Selaouit ouz ho pugale,
Mari,
Selaouit ouz ho pugale.

Pedit evidomp, pec'herien,
Brema ha var heur hon tremen,
Mari,
Brema ha var heur hon tremen.

Ma'z aimp ganehoc'h d'ar Baradoz
Da veuli Doue deiz ha noz,
Mari,
Da veuli Doue deiz ha noz.

AR SALVE REGINA.

Ni ho salud, Rouanez ann Elez,
C'houi zo hor mamm, ar vamm a drugarez,
Hon holl dousder, buez hag esperans,
Ni ho salud gant kalz a reverans.

D'eoc'h-hu, Guerc'hez, e kasomp hor pedenn,
Ni divroet ha siouaz ! pec'herien.
Ouzhoc'h, Guerc'hez, e kriomp er bed-ma
Ni pere zo bugale da Eva.

D'ehoc'h-hu bepred e tenn hor c'halounou,
D'ehoc'h e kasomp hor goelvan, hon daelou,
Hor fizians-ni zo enn ho madelez
Enn draonienn-ma leun a dristidigez.

Rak-se pa'z oc'h hon alvokadez ker,
Enn hor c'henver bepred dous ha tener,
Plijet ganheoc'h distrei ho taoulagad
Varnomp-ni holl ha prokuri hor mad.

Pa zeui ann deiz da guitaat ar bed-ma,
Goude ar fin euz hon eksil ama,
Diskouezit d'eomp neuze, mamm a druez,
Bizach Jezuz, eveuz ho kof ar frouez.

O Guerc'hez sakr, meurbet karantezuz !
O Guerc'hez dous ! o Mari truezuz !
Ni ho suppli, klevit ouz-hor pedenn,
Ha na zeuit ket d'hon dilezel biken.

Evidomp holl, Mamm zantel da Zoue,
Plijet ganheoc'h pedi he vajeze,
Ma veritimp reseo ar faveuriou
D'eomp prometet gant Jezuz, hon Aolrou.

KONSEKRASION D'AR VERC'HEZ. *Henry p. 112*

Santez Mari, Mamm Doue, e pep amzer guerc'hez,
Jezuz a zo va roue ha c'houi va rouanez ;
Evel ma'z eo va barner, bezit va fatrounez,
Hag evidon dirazhan bezit alvokadez.

Etouez ho servicherien me ho ped d'am reseo,
Meurbet eo dous ho servich, servich ar bed c'houero ;
Rak-se hoc'h abandouni, dilezel ho preuriez,
A ve redet d'ar malheur d'en em goll da james.

Euz va ferz e prometann na rinn na livirinn
Netra enep hoc'h henor ; biken na bermettinn
E ve den sujet d'inn-me ken hardiz, ken ingrat,
Da ofiansi Mamm Jezuz, eur vam ken dous, ker mad.

Evit gallout henori ann hano a zouget
A Vamm a-vizerikord, a Vamm Salver ar bed,
Me a bromet soulaji-ar beorien afflijet
Dre ma'z int holl ar memprou euz ho Mab benniget.

Hed va buez em euvrou va zikourit bepred,
Dreist peb tra var va maro n'am abandounit ket ;
Dre ho taouarn d'am Zalver prezantit-va ene,
Sur ez inn d'ar baradoz dre ho sikour goude.

FIZIANS E MARI.

Me a laka va fizians,
Guerc'hez, enn ho sikour,
Akkordit d'inn azistans
Enep hon adversour ;
Pa skoï va heur diveza,
Me bed ho madelez
Da obteni d'inn beza
Plaset gant ann Elez.

O Mamm leun a drugarez,
O Guerc'hez benniget,
E peb leac'h ha bemdez
Hor zikourit bepred ; *va di kourit, m'ho ped*
Prezantit d'ho Mab Jezuz *Reinigit d'ho Mab Jezuz*
Pedenn ho pugale, *va mennest, va goude*
James ne c'hell ho refus, *Ouzi'k n'ho a d'ho refus*
Sur oump a gement-se. *Ma brevad m'ho bined*

Guerc'hez gloriuz Vari,
Refuch ar bec'herien,
Me ho ped d'am c'honforti
Em spount, em zroublienn ;
C'houi am difenno guella,
Ho Mab zo va roue,
Ar pezh a ra d'inn krena,
Va barner eo ive.

Pa varvinn, va Mamm dener,
Truezuz em andred,
Kalmit justis va barner, /

Pe sur e vinn kollet.
O Mamm leun a vadelez,
Difennit ho pugel,
Ha betek fin va buez
D'ehoc'h me vezo fidel.

Evit kreski ar c'hloar
A zo dleet d'ehoc'h, Guerc'hez,
M'ho karo var ann douar,
Rouanez ann elez.
Evit plijout d'ho kalon
Ha guell hoc'h henori,
Kement den zo dindanon
A zouginn d'ho meuli.

*Torrit
Ange*

Sec'hit eta va daelou,
Mamm ar guir garantez ;
Va c'honsolit em foaniou
Hag em zristidigez ;
Torrit va holl jadenou,
Resevit va c'halon,
Rouanez euz ann Envou,
Renit, renit varnon !

51 KANTIK VAR AR MAGNIFICAT. *per chante*

Magnificat :

Ra viot, va Doue, glorifiet
Enn amzer, enn eternite !
Ra zeuio kement oc'h euz krouet
Da renta gloar d'ho majeste !
Kanomp, va ene,

Kanomp meuleudi da Zoue :
Anima mea dominum.

Et exultavit spiritus meus :

Pa daolann evez gant habaster
Ouz he vadelez em andred...
Va joaz da veza Mamm d'am Zalver,
N'ouzounn petra da lavaret...
Oh ! ker braz mister

A laouena holl va spered :

In Deo salutari meo.

Quia respexit humilitatem ancillæ suæ :
Euz ann Envou ann Holl-Gallouduz
A zellaz ouz va faourentez ;
He lagad douz ha trugarezuz
A velaz he zervicherez ;

Dre ze ounn euruz,
Euruz vint galvet da james :
Ecce enim ex hoc beatam me dicent omnes generationes.

Quia fecit mihi magna qui potens est :
Holl nerz Doue hag he vadelez,
Ha kaeroc'h tra rejont biskoaz ?
Va renta mamm, va miret guerc'hez...
Pebez burzud ha pebez graz ;
Tud vad hag Elez
Meulit he hano, meulit c'hoaz :

Et sanctum nomen ejus.

Et misericordia ejus a progenie in progenies :
He vadelez zó eur mor ledan,
N'euz ket a fin d'he denzorion :
Var gement den a zouj anezhan,
E peb amzer, enn holl broiou,
E skuill heb ehan
Gliz ker pinvidik he c'hrasou :
Timentibus eum.

Fecit potentiam in brachio suo :
Ouz nerz he vreac'h netra n'hell harpa,
He gleze eo tan al luc'hed ;
Ar pennou braz, ann dud huela
Er boultrenn a vez diskaret ;
Kaer o deuz gina,
Evel deliou seac'h int skubet :

Deposuit superbos mente cordis sui.

Deposuit potentes de sede :
Divar ho skabell aour rouaned
D'eur vro a bez a rea krena,

Edont, evel ann dervenn kalet,
Heb aoun rag ann amzer falla ;
Setu hi pilet
Ha var ho zron-tud a netra :
Et exultavit humiles.

Esurientes implevit bonis : *galloudik*
D'ann holl madou eo mestr souveren,
Mestr eo da rei ar baourentez ;
Da gant paour keaz a ioa dizouten *disoumek*
En deuz roet eur mor a zanzez,
Kant den a voien *arc'hautek*
En deuz rentet paour da james :
Et divites dimisit inanes.

Suscepit Israël puerum suum :
Ann holl boblou zo he vugale,
Leun int euz he vadeleziou ;
Evit Israël en deuz goulskoude
Muioc'h c'hoaz a vadoberion,
Dre m'en deuz choazet
Evit rei buez d'hon Aotrou :
Recordatus misericordiae suae.

Sicut locutus est ad patres nostros :
Rapari goall ann natur humen
En doa prometet d'hon tadou,
Ober gant Abraham da viken
Ha gant he vouenn alliansou,
Setu ann termen
Ma teu da vir-he holl gomzou :
Abraham et semini ejus in sæcula.
Gloria patri, etc.

52 EVIT BEVA GANT LEVENEZ

TON NEVEZ

Evit beva gant levenez
N'euz ket ezomm aour na perlez,
Nag eur c'hastell a ve savet
He gern betek bro ar stered :
Dindan ar soul, enn eul lochenn,
Ar paour a c'hell c'hoarzin laouen :
Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.

Evit beva gant levenez
N'euz ket ezomm aour na perlez,
Hag o pefe holl a leve
Leoun, ha Treger, ha Kerne, *brenfe h*
Gant ho tanvez ne brenfot ket
Eunn hanter-devez eurusded :
Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.

*omni
hor
omni*
Evit beva gant levenez,
N'euz ket ezomm aour na perlez.
Kaloun ann den a zo c'hoantuz,
P'en deuz bet guenn e c'houlenn ruz,
Pe vez sec'hor e c'houlenn glao...
Eunn dra bennag a vank atao :
Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.

Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.
Euruz, euruz eo ann hini
Zo da Jezuz ha da Vari ;

Gant Jezuz hag he Vamm zantel
Mad eo beva, dous eo mervel :
Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.

53 ENN HENOR D'AR VERC'HEZ.

TON : O filiù et filiæ.

Diskan :

Bemdez, bemnoz hag e peb ti,
Meulomp Mari !

Pegen kaer eo ar c'hantikou,
Pegen euruz ar parrezioù
Pa lavar holl ar c'halounou :
Meulomp Mari !

Plijet ganehoc'h, Sent hag Ele,
Unani ho mouez gant hor re,
Hor c'han a vo kaeroc'h neuze :
Meulomp Mari !

Ni zo da Vari konsakret,
Da Vari ni vezo bepred, *Ha da Vari ni vo lepad*
Kanomp eta gant joauzded :
Meulomp Mari !

Kalz a zoug respet da Vari
Ha kalz o deuz fizians ennhi,
Ama ann holl a zo dezhi :
Meulomp Mari !

Mari, var ann Elez renét,
Ann anaoun a boan tennet,
Torrit holl nerz ann drouk-spered :
Meulomp Mari !

*guis felle
Gouren*
Mari, refuch e peb mare,
Mamm dous bepred d'ho pugale,

C'houi hor c'hunduo da Zoue : *ho e haso betek
Doue*
Meulomp Mari !

Mari, n'hellomp obten pardon, *(Kant u pardon)*
Na trec'hi ann dentasion,
Nemed dre ho proteksion :

Meulomp Mari !

Heb Mari ne ver ket salvet,
Gant Mari ne ver ket kollet,
Mari, ni a vo dehoc'h bepred :

Meulomp Mari !

Selaouit, Mari, hor pedenn, *d'ho difenn*
Hed hor buez deut difenn,
Deut var hor maro d'hor zouten :

Meulomp Mari !

Mari, pa'z oc'h ken gallouduz,
Bezit ive trugarezuz,
Hor prezantit d'ho Mab Jezuz : *c'hinniget*

Meulomp Mari !

Grit ma vezo justis Doue
Dous e kenver ho pugale,
Grit ma'z aimp da gana enn Ee : *d'ann Me*

Meulomp Mari !

54 DEVOSION D'AR VERC'HEZ. *Henry 113*

an doue
Diskan :

Ar voien d'en em asuri
Eveuz hor zilvidigez,
Eo beza d'ar Verc'hez Vari
Devot epad hor buez.

Mari a zo Mamm da Zoue,
Guerc'hez eo ar guerc'hezed,
Jezuz, hor zalver, hor roue,
Gant Mari zo bet maget.

Mari zo leun e dourn santel
Euz ar grasou nerzusa,
Var he zervicherien fidel
Laouen 'vez ouz ho skuilla.

glan
Mari zo pur dreist peb hini,
Guenn eo dreist bleuniou ann Ee ;
Ma teuit a galoun d'he fedi,
C'houi vo pur ha chast ive.

Mari gant he zroad benniget
A zalc'h goasket penn Satan ;
Dreizhi ni vezo diouallet
Diouz he flemm hag he alan.

Mari eo ar verelaouenn
Var he zal liou kaer ann aour,
Hi eo iec'hed ar glanvourien
Hag esperans ar pec'hour.

Mari enn Env zo rouanez
Ann holl Zent ha Sentezed,
Dirazhi e stou ann Elez,
He meuli a reont bepred.

Mari eo dor ar baradoz,
Dreizhi eo mont da Jezuz ;
Klaskomp eta kaout he bennoz,
Ma vezimp eunn deiz euruz.

55 ANN ITRON VARIA. *Henry 304*

Ton : Bale Arzur.

Diskan.

Peger kaer eo Mamm Jezuz,
Pegen dous ha trugarezuz,
Peger mad ha madelezuz !

Lavar d'inn me, denn ann Arvor,
Ha ker kaer eo da vag var vor
Gant he goueliou guenn-kann digor ?

Lavar d'inn-me, den ann Argoat,
Ha ker kaer deliou glaz ar c'hoat,
Pa zeu eur ban-eol d'ho-skleraat ?

Lavar d'inn-me, den ann Are,
Ha ker kaer eo lein ar mene
Guenn-kann gant ann erc'h d'ar beure ?

Lavar d'inn-me, paotr ann denved,
Hag hen zo steredenn ebet
Ker kaer enn noz steredennet ?

Livirit d'inn, tud ar meziou,
Ha ker kaer ez eo glazennou
O lintra gant ar glizennou ?

Livirit d'inn, bugaligou,
Er prajou o kutuil bleunioù,
Ha bleun ker kaer zo er prajou ?

— Nag enn Arvor, nag enn Argoad,
Er menez, enn oabl nag er prad,
Netra ker kaer, netra ker mad.

56 KANTIK SANT KASIMIR, ROUE.

O va ene, kanomp bemdez
Da Vari meuleudiou :
He oberiou, he oll vuez *he holl buhez*
A zo leun a vurzudou.

Diskan.

Gloar da Vari
Ha meuleudi !
Pebez buizud evuruz !
Mari guerc'hez,
Ha mamm ivez,
Guerc'hez ha Mamm da Jezuz !

Teod ann den a zo goall dister
Evit komz euz a Vari : *Sanon. Mari*
Mes he c'haloun a zo tener,
Holl e c'hellomp he meuli.

Euz Mari ann Iliz santel *he santel*
A denn gloar ha sklerijenn,
Hag he buez selestiel
A zo skouer ar gristenien.

Mari, 'lavar d'he bugale :
Sentit, sentit ouz Jezuz ; *sentit ouz Jezuz*
Karint-henn enn hoc'h holl bue, *enn hoc'h holl bue*
Hag ho rento evuruz. *Ha gant ar c'hoat eo leun*

Kalounou trist ha glac'haret
Deut da gavout ar Verc'hez ; *holl da gavout*
Gant Mari e ver konfortet
E peb seurt poan hag enkreuz.

*Gant e bue a vo konfortet
Er vras deus-hoc'h*

O Mari, guir Vamm da Jezuz,
Grit ma'm bezo gras Doue ;
Ouz ar pec'hed, Mamm druezuz,
M'ho ped, mirit va ene.

Chast ha modest, dous a galon,
Sobr ha fidel da Zoue,
Fur em spered, em c'homz guirion,
Ra vezinn e peb mare.

Bezit sikour ar gristenien
Hag ar peoc'h d'ezho rentit ;
Euz a bep drouk, ha bep anken,
Hor c'halounou diouallit.

Evidomp holl pedit Jezuz,
Pedit, Mamm a drugare.
Finvez ar bed a vo spontuz,
Difennit ho pugale.

Ar re a zeu e guirionez
Var ann douar d'ho pedi,
Grit ma'z aint gant ann Elez
D'ar baradoz d'ho meuli.

ENN HENOR DA GALOUN MARI.

Kaloun douz a Vari,
Leun a garantez,
Ni deu d'ho saludi
Gant ann holl Elez.

Diskan.

Ave, ave, ave Maria !
Ave, ave, ave Maria !

Feunteun ann holl grason,
Sellit gant true
Ouz ann holl ezommou
Euz ho pugale.

Tenval eo ar goabrenn,
A bep tu arne,
Dilezet ar bedenn,
Dilezet Doue.

Ia, memez enn hor Breiz,
Guech all bro ar Zent,
Da Zoue, d'he lliz
Kalz a zo dizent.

Roit d'ann den dallet
Gras ar sklerijenn,
D'ar pec'her kaledet
Gras ar binijenn.

Enn hon tiegeziou
Lakit union,
Hag enn hor c'halounou
Guir relijion.

C'honi zo Mamm da Jezuz,
Mamm ar gristenien,
Refuch trugarezuz
D'ann holl bec'herien.

Stouet oump d'ann douar
Dirak ho kaloun,
Gant keuz ha gant glac'har
O c'houlenn pardoun.

Brud euz ho trugarez
A zo e peb bro,
'Vit ker braz madelez
Holl ni a gano :

Ennhoc'h hon holl fizians
Epad hor bue,
Ennhoc'h hon esperans
Er maro ive.

58 KANTIK ITROUN AR ZILVIDIGEZ.

Dallet oamp holl ha mezvet gant ar pec'hed,
Heb aoun na mez e torrempe ho lezenn,
Ha red vo c'hoaz d'ar gurun ha d'al luc'hed
Diskouez ez euz eur mestr azioc'h hor penn ?

Diskan :

Truez, va Doue,
Truez, va Doue,
Hor c'heuz zo braz ;
Savit ar Frans heb dale } *bis.*
Ken huel ha biskoaz.

Enn arne du eur steredenn o para
A ro kaloun ha nerz d'ar sturier paour ;
Sellit enn env, ar c'hommoul a danoa,
Rak savet eo ar verelaouenn aour.

Guerelaouenn, piou oc'h-hu 'met ar Verc'hez
Zo diskennet var gern hor menezioù ?
C'hui eo, Mari, itroun ar zilvidigez,
Ha dont a rit ho tourn leun a c'hrasou.

Guerelaouen, c'hui eo ar vamm benniget,
Ar vamm dener, ar vamm madelezuz ;
C'hui lavar deomp : Pedit ma viot selaouet,
Ma pardouno kaloun va mab Jezuz !

Pedit, pedit ha skuillit ive daelou,
Rak me a bed, dour zo em daoulagad ;
Dre ar c'hlaç'har goalc'hit piz ho pec'hejou,
N'o pet ket aoun, ho parner eo ho tad.

O Guerc'hez dous, eienenn ann esperans,
Eharz ho treid emamp oc'h hirvoudi.
Bro-C'hall e kaon a zell ouzhoc'h gant fizianz,
Hor zelaouit, hor zikourit, Mari !

59 KANTIK PELERINED LOURD.

TON : Catholique et Breton toujours.

Diskan.

Guerc'hez sakr, Mamm garet Breiz-Izel,
Dalc'hit stard ar feiz koz e kreiz ar Vretouned ;
Selaouit euz ann Env hor iouadenn santel : { *bis.*
Katholik ha Breizad bepred !

Euz ar garrek eunn dour burzuduz
A red, a red heb ehana ;
Ho feunteun eo, Mamm douz va Jezuz,
Ha c'hui lavar : It da eva !

Var hon daoulin ha goude pedi,
Ni a evo, a evo c'hoaz,
Enn hor c'haloun fizians e Mari,
Enn hor c'herc'henn chapeled braz.

Mar tiskennit var gern ar reier,
 N'eo ket gant kelou ar maro ;
 Ma c'houlennit chapel ha kleier,
 N'eo ket da zini glaz hor bro.

C'houi a zigoraz ann eienenn,
 Mes c'houi a c'houlenn dour ive,
 Daelou a geuz, dour a binijenn,
 Da vouga kurunou Doue.

Bezit laouen, rak heb dalea
 Ar Frans e kaon e deuz sentet.
 Ped den e Lourd zo bed o lenva...
 Penaoz eta e vemp kollet ?

60 AR MEMORARE.

TON ANAYEZET.

O Guerc'hez Vari, leun a druez,
 O pezet envor, me ho ped,
 Penaoz biskoaz den enn he vuez
 N'en deuz na gueleit na klevet
 O pije lezet enn abandoun
 Nikun a gement a zeuje
 D'en em erbedi d'hehoc'h a galoun,
 Daoust pegen braz pec'her vije.

Nann, ne zeuit james da zilezel
 Nep a zeu, gant fizians ennoc'h,
 Da guzat dindan ho tiouaskell
 Ha da c'houlenn skoazell ouzhoc'h.
 Hirio gant ar fizians-se memes,
 O Guerc'hez, mamm ar guerc'hezed,
 E tostaen ouzhoc'h, ho madelez
 Am zenn varzu ennhoc'h bepred.

Oc'h hirvoudi dirazhoc'h aman,
 Evel eur pec'her braz ma'z ounn.
 Ann hardisegez a gemerann
 Da c'houlenn dreizoc'h ar pardoun ;
 Pa'z oc'h guir Vamm va Zalver divin,
 Na zisprijit ket va c'houmzou ;
 Mes trugarezuz klevit ouzinn,
 Plijet rei d'inn va goulennou.

61 GUIR VUGALE AR VERC'HEZ.

TON NEVEZ : Iliz Plobannalek.

Guir vugale ar Verc'hez a dle beza santel
 Ha startaat e gras Doue bemdez betek mervel.
 Ann dud laosk-se ne rafent nemed fallgalouni,
 Penaoz a c'hellfent beza bugale da Vari ?

Guir vugale ar Verc'hez a vezo chast a fur,
 Strinka raint euz ho c'haloun peb elfenn tan impur ;
 Lent vezo ho daoulagad ho ginou heb gevier,
 Ne d-aint morse d'al lec'hiau a ve ennhou danjer.

Guir vugale ar Verc'hez diouz ann noz, ar mintin,
 Evit adori Doue a gouezo d'ann daoulun :
 Abred ema ar pec'hed var roudou ann hini
 A zo, siouaz evithan, dieguz da bedi.

Guir vugale ar Verc'hez a garo ho neza,
 Gant ar paour, enn han' Doue, e rannint ho bara ;
 Ober a raint jeuzded hag ho mamm hag ho zad,
 Dre ma vint dous ha sentuz, ha mad da labourat.

Guir vugale ar Verc'hez a vezo aketuz
 Da vont, eur vech ann amzer, betek aoter Jezuz,
 Evit he zigemeret gant feiz ha karantez,
 Ha bale, heb fazia, var hent striz ar vuez.

Guir vugale ar Verc'hez a vezo da Zoue
Ho c'horf gant he skianchou, ho c'haloun, ho ene ;
Kerzet raint er sklerijenn, ho dourn e dourn Mari,
Betek ann deiz ma velint ann Env o tigeri.

62 EZOMM A VARI. *Henry 28/11*

TON : Pennheres Keroulaz.

Mari, hor mamm garanteuz,
Ah ! taolit eur zell truezuz
Varnomp el leac'h-ma dastumet *leannet*
Evit ho meuli, mamm garet. *distumet*

Ezomm en deuz enn he neizik
Deuz askel he vamm ann eunik ;
Dindan ho tiouaskell ive,
Mari, lakit ho pugale.

pink D'ann hanv, pa vez ann heol re domm,
Ann deuar a c'hlaou en deuz ezomm,
Digasit varnomp gliz Doue,
Mari, seac'h-korn eo hon ene.

Ezomm o deuz ann denved keiz
Da veza miret'ouz ar bleiz ;
Ni or beuz ezomm, Guerc'hez c'hlan,
Da veza miret diouz Satan.

Eur c'hraouadurik pa'z eo klanv,
Pa 'ma ann derzienn vraz ganthan,
A lar d'he vamm : Eul lommik dour !
Klanv oump, Guerc'hez, deut d'hor sikour.

Pa vez kounnaret ar mor braz,
Bagik ar pesketour, siouaz !
Gant ann tarziou a vo lounket
Ma ne d-eo gant Doue dalc'het.

Ar bed a zo eur mor spontuz,
Leun eo a gerrek danjuruz, *un a nac'her bag breudezenn*
Hag hor bag ni zo ken dister,
Truez ouzomp, o Mamm dener !

63 ANAOUDEGEZ VAD E KENVER MARI. *Henry 306*

TON : Al lochenn.

O Guerc'hez Vari, va Mamm ger,
Ehan d'ho karout na rinn biken,
Rak c'houi zo ker mad em c'henver
Ma venn goall-fallakr ma n'ho karfenn.
E pe leac'h e venn-me brema,
Ma n'o pije ken aliez
Miret ouz Doue d'am barna
Ha d'am skei enn he vuhanegez ?

Ia, na ped ha ped guech, siouaz !
Ne d-ounn ket deuet dre va fec'hejou,
Dre va fec'hejou meurbed braz,
Da skuiza madelez va Aotrou ?
Mes pa zave he zourn pounner
A zioc'h va fenn evit va flastra,
C'houi 'zirede, o Mamm dener,
A lamm d'he vreach evit he harza.

C'houi a bed, a vouel, hag ho taelou
A ro d'ho pedenn eunn nerz nevez ;
Touch a rit kaloun ann Aotrou,
Mouget oc'h euz he vuhanegez ;
Va espern a ra eur vech c'hoaz
Hag o selaou mouez he drugarez,
Jezuz a ziskouez d'inn ar groaz
Hag enn he harz ar gador-govez.

Spountet hag ive glac'haret,
Da glask va c'honfesour me vale,
Hag hen o veza va c'hlevet
Am absolv gant joa a berz Doue ;
Ha setu me c'hoaz ken seder,
Mil bennoz d'ehoc'h, o Mamm benniget,
Da henvel Doue, va zad ker,
Ha da gredi ounn ganthan karet.

Setu me c'hoaz varzu ann Ee
Da zevel va daoulagad joaiuz,
Ha da esperout adarre
Beza ennhan eunn deiz evuruz.
Ia, mar d-ann d'ar baradoz
Da velet Doue ha d'ho kulet,
Ne skuizinn o rei mil bennoz
D'ehoc'h-hu, o va Mamm muia-karet.

64 PEDENN D'AR VERC'HEZ *Henry 307*
EVIT AR BEC'HERIEN.

Mari, c'houi zo d'ann holl bec'herien
Eunn alvokadez dous ha mad,
Grit ma vezint ho servicherien
O renons a grenn d'ho goall stad.

C'houi oc'h euz gulet ho Mab Jezuz
Ouz ho c'hlsk epad meur a vloaz,
Bezit ivez outho truezuz
E c'hiz ma'z eo bet a viskoaz.

A bep tu o guelann goall-gaset
Gant enebourien ho ene,
Nemed ganehoc'h e vent sikouret,
Allaz ! biken ne d-aint d'ann Ee.

Evitho 'ta, Mamm a drugarez,
Livirit eur gomz d'ho Mab ker,
Aoualc'h 'vezo, ni hen anavez,
Evit touch he galoun dener.

He vugale int holl, c'houi her goar,
Koustet int d'ezhan he holl c'hoad,
Hag evelse e c'houlenn he c'hloar
E tistrofent outhan 'vit mad.

C'houi hoc'h-unan oc'h euz da velet
Pa bedit ker c'houek evitho,
Rak hoc'h henor a vezo kresket
O karout ar pardoun d'ezho.

Grit eta m'ho guelimp o veva
Euz eur vuez vad ha santel,
O devez, siouaz ! bete vrema
Kollet dre ar pec'hed marvel.

65 GOUEL MARIA GERZU.

AR VERC'HEZ KONSEVET HEB PEC'HED.

TON : *Theophilus.*

Holl vugale Adam
Zo divar ar pec'hed,
Nep hini n'eo dinam
O tont ebarz er bed.

*Kantik all : Henry 295
"Bon eta eo bannig..."*

Ne d-oump ket ganet c'hoaz,
Ha setu ni maro...
Rak hon ene, siouaz !
Zo louz ha divalo.

Unan, unan hebken,
Diouallet gant Doue,
Evel eul lilienn
Zo guenn-kann he zae.
Da zant Joachim eo merc'h
Ha da zantez Anna,
Ker pur eo hag ann erc'h
Euz ann env o koueza.

Mari zo leun a c'hras
Abaoue m'euz anezhi,
Santel eo, santel c'hoaz,
Santel dreist peb hini.
Mari zo benniget
A bep eternite,
Dre ma'z eo bet choazet
Evit Mamm da Zoue.

N'ez oa nag herr na sao
Gant dour ann eienenn,
Ne goueze ket a glao
A greiz ar goummoulenn ;
Stard var he dreid pounner
N'oa ket sounn ar menez,
Pa zonzaz lor C'hrouer
E gened ar Verc'hez.

N'en doa ket staget c'hoaz
Tommder ha sklerijenn
Ouz al loar, ann heol braz,
Ha tal ar steredenn,

Pa baraz he lagad,
A dreuz ar c'hanvejou,
Var eur verc'h dous ha mad,
Var Mamm dous hon Aotrou.

Nann, nann, biskoaz pec'hed
N'hellaz dua Mari,
Biskoaz ann drouk-spered
N'en devoue guir varnhi.
Ar zarpant bilimuz
A flemm holl dud Adam,
Mes diouthan Jezuz
En deuz miret he Vamm.

Bezit laouen, Anna,
Ha c'houi, Joachim, ive,
Ho merc'hik, dreist peb tra,
Zo plijet da Zoue.
Euz a c'hloar ho falez
Tri Fersoun ann Dreinded
A zell gant karantez
Ouz ti paour Nazareth.

C'houi ive, pec'herien,
Kollet enn noz tenval,
Bezit, bezit laouen,
Leac'h oc'h euz da zridal :
Dinam a bep pec'hed
Konsevet eo Mari,
Setu azioc'h ar bed
Ann deiz o c'houlaoui.

66 GOUEL MARIA VENGOLO.

GINIVELEZ AR VERC'HEZ.

TON : Venez, divin Messie.

Diskan.

Kanomp eur, c'hantik nevez
Enn deiz-ma kaer ha benniget,
Setu ganet ar Verc'hez
E kearik Nazareth.

Eur c'hrouadur o tont er bed
A zigas ganthan joauzded
D'he gerent ha d'ho mignoured :
Merc'hik Joachim hag Anna,
Mari, muia karet Doue,
A ra dridal gant joa
Ann douar hag ann Ee.

Da zaludi ho rouanez
E tinij Elez, Arc'helez,
Euz ar baradoz, ho falez ;
Holl e chomont souezet
Pa zeuont enn ti paour ha dister,
Rak biskoaz n'o deuz guele
Netra, netra ker kaer.

Guele n'o deuz, biskoaz guele,
Goude tri Fersoun ann Dreinded,
Netra ker pur ha ker parfet.
Piou eo houma ? emezho,
O stoui gant humilite.

— Hounnez, Elez, a vezo
Eunn deiz Mamm da Zoue !

Mari zo treac'h enn he c'havell
Da c'hragez brudet Israël,
Da Rebeka, Judith, Rachel ;
Koant eo 'vel eul lilienn
Arc'hantet gant gliz ar mintin,
Ann heol n'eo ket kel laouen
Hag hi o vouse'hoarzin.

C'hoarzit, c'hoarzit, Guerc'hez dispar,
Ne reno mui var ann douar
Ar goanv a zo tremenet
Gant he skourn hag he avelou,
Dindan ho treid benniget
E sav ar bokedou.

Peoc'h, ha pardoun, ha karantez,
Setu ar bokedou nevez
A zav dindan treid ar Verc'hez ;
Ar gurun, boaz da darza
Euz ar c'hoummoul var ar pec'her,
A jom brema da iena
E daouarn hor barner.

Eur goulm guech all a zigasaz
Da lestr Noe eur bodik glaz,
Pa'z ea kuit ann doureier braz :
Mari, ho kinnivelez
Eo esperans hor c'halounou,
C'houi eo ar bod olivez
A verk fin hon daelou.

67 **GOUEL MARIA VEURS.**

TON : *Du séjour de la gloire.*

Kaset e voue gant Doue
Ann arc'hel Gabriel
D'eur gear a C'halilee,
D'eunn ti paour ha santel,
Kaset voue da Nazareth
Gant urs da zaludi
Eur verc'hez dous ha parfet
A ioa hanvet Mari.

Mari, nevez dimezet
D'eur zant euz he lignez,
Evithi da gaout pried,
A ioa pur ha guerc'hez,
Ker pur hag ann dour eien
Pa strink euz goask ar vein,
Pe ar c'haera sklerijenn
A darz diouz ar mintin.

O veza deuet dirazhi
Ann El a lavaraz :
Me ho salud, o Mari,
Rak c'houi zo leun a c'hras :
Ganehoc'h ema ann Aotrou,
Ha dreist ann holl gragez
C'houi gant Roue ann Envou
Zo benniget, Guerc'hez !

Mari, o veza klevet
Hevelep prezegenn,
En em gavaz enkrezet
Hag e Doue krenienn :

— Arabad eo d'ehoc'h krena,
Eme gannad Doue,
Eur c'helou euz ar c'haera
A deu d'ehoc'h euz ann Ee.

Eur c'hrouadur o pezo
Eur mab holl-c'hallouduz ;
Setu ama he hano ;
C'houi er galvo Jezuz.
Rena a rai var Israël
Hed ann eternite,
Dont a ra euz ann huel,
Gwir vab eo da Zoue.

— Guerc'hez ounn hag e vezinn,
A respountaz Mari,
Penaos eta e c'hellinn
Beza mamm d'ar Mesii ?
— Chom a reot, eme 'nn'Arc'hel,
Guerc'hez pur a dinam ;
E skeud ar Spered-Santel
C'houi deui da veza mamm.

Netra n'hell beza diez
Da nerz ar Spered-Glan,
Hadet e vez ar vuez
El leac'h ma plij ganthan,
Ha setu ho kiniterv,
Enn despet d'he c'hosni,
Ne vo mui hanvet dizher :
Eur mab a deu d'ezhi.

Ra vezo great bolontez
Mestr gallouduz peb tra,
Me zo he zervicherez,
Senti 'rann gant joa.

Raktal e voue konsevet
Jezuz, guir Vab Doue,
Hag ann Arc'hel benniget
A zistroaz d'ann Ee.

68

NOUEL.

TON ANAVEZET.

Pa voue ganet Jezuz, hor Zalver,
Mari, he Vamm, her mailluraz,
E Bethleem, enn eur c'hraou dister,
Var ar plouz hi hen astennaz.

Gloria in excelsis Deo. (bis)

Rak sant Joseph enn hostaleri
N'en doa ket kavet a zigor,
Red voue d'ezhan koulz ha da Vari,
Enn eul leac'h paour klask ar goudor.

Gloria, etc.

E kichenik ez oa pastored,
Hag hi dihun ha c'hoaz var zao,
Dre ma'z edont var dro ho denved,
Ouz ho diouall e giz ar vro.

Gloria, etc.

Setu eunn Eal, deuet a berz Doue,
O chom a za enn ho c'hichen,
Ha spountet holl e voue ann dud-se
Dre eunn tarz braz a sklerijenn.

Gloria, etc.

— N'o pezet aoun, eme 'nn Eal santel,
Guir ebed noc'h euz da grena,
Me zigas dehoc'h ha d'ann dud fidel
Eur c'helou mad ha leun a joa.

Gloria, etc.

E kear David eo ganet hirio
Salver ar bed, guir Vab Doue ;
Selaouit mad ha me lavaro
Penaos anaout ho roue.

Gloria, etc.

Kaout a reot eur mabik bihan
Hag hen mailluret enn eur c'hraou.
It, pastored, ha kerzit buhan,
It, hag adorit hon Aotrou.

Gloria, etc.

Ann Eal a veac'h en doa prezeget,
Ma teuz evel arme ann Ee,
Elez, Elez er vann voue klevet
O kana da veuli Doue.

Gloria, etc.

Tud ann draonienn, tud ar meneziou,
Kanomp enn huel hag er prat :
Gloar da Zoue, e barr ann Envou,
Var ann douar peoc'h d'ann dud vad !

Gloria, etc.

69

MARI E TAL AR GROAS.

TON : *Ar c'hlanavour*, ha ton nevez.

Piou lavaro pebez glac'har
E devoue var menez Kalvar

Tenera Mamm zo bet biskoaz,
P'edo he Mab stag ouz ar groaz ?

Hi a lenve, a hirvoude,
A huanade, a grene,
A lenve c'hoaz e tal Jezuz...
Netra morse ken truezuz.

Kriz e ve kaloun ann hini
A zonjo e poaniou Mari,
Ma n'eo treuzet gant ar c'hlese
A dreuzaz kaloun Mamm Doue.

Rak evidomp-ni, pec'herien,
Emedo Jezuz enn anken ;
Hon dle a renkaz da baea
Betek ann diner diveza.

Evidomp-ni e red he c'hoad,
Evidomp-ni eo stag ouz ar c'hoat,
Eo dispennet gant ar fouetou
Ha gouliet gant ann tachou.

Hon ourgouill-ni enn he empenn
A zankaz spern ar gurunenn ;
Enn abeg d'hon avarizded,
Tregont diner eo bet guerezet.

Mard-ema hor Zalver enn noaz
Al luksur eo hen diviskaz ;
Hor mezventiou milliget
A ro d'ezhan ker braz sec'hed.

Penaoz e c'hellit, o Guerc'hez,
Chom enn ho sa var ar menez,
E kreiz soudardet, bourrevien,
Hag eur bobl kriz a luzevien ?

Haute-Est Henry 301

Ann ebestel a zo tec'het,
C'houi, Mamm dener, ne dec'hit ket,
Epad teir heur var ar C'halvar
E chomit beuzet er c'hlaç'har.

Sevel a rit ho taoulagad,
Ha pa velit Jezuz leun-c'hoad,
Ho pen a gouez. ..., mes adarre
E klaskit gullet Mab Doue.

O rouanez ar verzerien,
Truezit ouz ar bec'herien,
Her gout a rit, ker oup koustet,
Mirit eta na vemp kollet.

Grit d'eomp anaout priz hon ene,
Talvout a ra goad eunn Doue.
O va ene, peur a sonji
E poaniou Jezuz ha Mari !

70

EVIT DIGERI MIZ MARI.

Henry 281
St Germain

Ton : *Theophilus.*

Ar goanv en deuz kuiteat gant he frim ann douar,
Ann erc'h teuzet a red divar lein ar menez,
Gant ann nevez amzer e c'houez ~~ann~~ avel glouar,
Ar bed holl a zihun hag a gav ar vuez.

Dindan lagad ann heol a bep tu ne veler
Nemed bokedou koant o tispak ho deliou :
O saludi miz mae a beb tu ne glever
Nemed eunedigou o kana ho zouniou.

Gant ho muzik ken dous, ken leun a velodi,
Unanomp hor mouez ha dastumomp bleuniou,
Evit kaeraat aoter hor Mamm garet Mari,
Hag holl d'ezhi gant joa goestlomp hor c'halounou.

Mari evidomp holl a zo leun a zouder,
Roet e deuz d'eomp mil guech merkou a garantez.
Epad ar miz kaer-ma, tro-var-dro d'he aoter,
Ni en em zastumo d'he zaludi bemdez.

Offromp ama d'ezhi hon henoriou dister,
Hi a daolo varnomp sellou a garante;
Netra na ra bleunia kaloun eur vam dener
Evel al lid a ra d'ezhi he bugale.

Mar bezomp aketuz da henori Mari, *d'an Neron eun deuz*
Hi hon tenno ganthi da-var ann Enn eunn dez;
Eno e kreiz ar joa, ar c'han, ar velodi,
E kavimp, var ar fin, ha peoc'h ha levenez.

71 EVIT KLOZA MIZ MARI.

Ton : *Adieu, à la grâce de Dieu.*

Tremenet eo ar miz santel
Zo-konsakret d'ehoc'h Mari,
Bodet bemdez enn ho chapel,
Dous e kavimp kana, pedi.
Pa vezer ker brao asambles
Ha red e vije kimiada !
Perak eta eo ar vuez
Hir ann anken, berr ar joa ?

Diskan.

Miz mae, kenavezo,
Buhan oud eat en dro, } bis.
Miz mae, kenavezo !

M'oc'h euz sellet ouz ar bleuniou
Ar gutuillem var bord ann dour,
Ma plijaz d'ehoc'h hor c'hantikou,
Guerc'hez Vari, roit d'eomp sikour !

Ni zo dinerz, Satan zo kre,
Ar c'hig, ar bed zo ker krenv all,
Guerc'hez Vari, enn han' Doue,
Ne baouezit ouz hon diouall.

Var hon daoulun enn ho kichen,
Guerc'hez, arak dispartia, *santel hent kimiada*
A greiz kaloun ni a c'houlenn
E teufac'h holl d'hor benniga.

Eur vamm a dle deiz ar c'himiad
Rei he bennoz d'he bugale :
Pa'z oc'h eta eur vamm ker mad
Hor bennigit euz barr ann Ee.

72 KANTIK DA ZANTEZ ANNA.

Ton : *Al levier.*

Santez Anna, hor patrounez, (bis)
Ni ho salud gant karantez.

Diskan :

Da zantez Anna (bis)
Pelerin a ia
A gav sikour ha joa.

Santez Anna, mamm goz Jezuz,
C'houi a zo mad ha gallouduz.

Santez Anna, mamm da Vari,
Gant fizians ni zeu d'ho pedi.

Var ho kaloun c'houi a stardaz
Ar Verc'hez dous a leun a c'hras.

Jezuz-Krist, mestr ar baradoz,
 A glev atao ouz he vamm goz.
 Bepred Mari a vez laouen
 O rei d'he mamm peb seurt goulenn.
 Deomp holl eta, deomp, Bretouned,
 Da di hor patrounez karet.
 Tud koz, savit hag it enn hent
 Evit goulenn maro ar zent.
 C'houi, tud iaouank, 'vit ho puez
 Goulennit tenzor ar furnez.
 Mammou kristen, kerzit ive
 Da glask bennoz d'ho pugale.
 Nep ne gar ket mamm ar Verc'hez
 Deuz Breiz-Izel n'eo ket hennez.

73
 SANT JOSEPH. *Henry 323*

TON ANAVEZET.

Diskan :

Sant Joseph, pried Mari,
 Tad mager da Jezuz,
 Ni fell d'eomp hoc'h henori,
 Patroun karantezuz.

Karet jeus
 Mirer choazet gant Doue
 D'he Vab ha d'ar Verc'hez,
 Bet oc'h euz enn ho pue
 Anken ha levenez.

9. ho puez
 Evit digemer Jezuz
 N'hoc'h euz na tan na ti;
 Ho kaloun zo evuruz *a-30 zured*
 O tont d'hen adori.

Pa glask Herodes Jezuz
 D'hen lakaat d'ar maro,
 Gant pebez feiz burzuduz
 Her c'hasit da bell bro !

Pebez poan ! epad tri dez
 Jezuz a zo kollet :
 Goude, pebez levenez !
 Jezuz a zo kavet.

Ho labour en deuz maget
 Ho krouer, Mab Doue ;
 Enn he labour, mestr ar bed
 Ouzoc'h-hu a zente.

Var ann douar trubuillet,
 C'houi brema enn Envou
 A zo gallouduz meurbet :
 Roit d'inn va goulennou.

*miss dans
Gouin*
 Jezuz a bleg d'ho pedenn
 Hag he vamm, ho pried :
 Eur c'hras am euz da c'houlenn,
 Eur c'hras d'inn goulennet.

Pa vinn galvet gant Doue
 Patrounn ar maro mad,
 Deut gant eunn dorn a drue
 Serrit va daoulagad.

Tost d'ehoc'h ha tost da Vari,
 E kichen tron Jezuz,
 Ra'z inn enn Env d'ho meuli,
 Va fatroun evuruz !

*San Neno
Patron karantezuz*

KANTIK ALL DA ZANT JOSEPH.

TON ANAVEZET.

Diskan.

74
Nep a gar beva fur hag euruz
Ha mervel heb spount nag anken,
Da Joseph, patrour karantezuz,
A dle gant feiz kas he bedenn.

Pried da Vari, mamm ha guerc'hez,
Tad mager da Zalver ar bed,
Divlam ha fidel, skouer ar furnez,
He c'houlenn en defe bepred.

E kraou Bethleem ec'h ador Jezuz,
Enn Ejipt hen c'honfort ive,
P'hen koll, o koll 'vithan glac'haruz !
Her c'hilask, her c'hav goude tri de.

Diganthan 'n deuz he vagadurez
Ann Hini grouaz ar bed-man,
Ha Mab ann Holl-C'hallouduz memes
A blij ganthan senti outhan.

Var he dremenvan, enn he gichen
Hen a vel Jezuz ha Mari,
Hag etre ho divreac'h e tremen
Goude ann dousa angouni.

Gloar d'ann Tad, d'ar Mab, d'ar Spered-Glan,
Gloar d'eunn Doue e tri fersounn.
Meulomp holl, kristenien, a-unan,
Meulomp sant Joseph, hor patrour.

75 ENN HENOR D'HON EL-MAD.

TON : Ar barz baleer.

Va diouallit, Elik Doue,
Mirit va c'horf ha va ene. (bis)

Diskouezit d'inn e peb amzer
Bolontez santel va Zalver.

Va mirit diouz ann drouk-spered
Ha dreist peb tra diouz peb pec'hed.

Lakit evez na venn troumplet
Dre 'r fallagriez zo er bed. *ne fellec'h gouned*

Em c'hichenik chomit atao,
Dreist holl pa zeui heur ar maro. *pa zeui ar maro*

Roit d'inn neuze kalz a zaelou
Da vouela va holl fec'hejou.

Evit ma c'hellinn da Zoue
E stad vad renta va ene.

76 BREURIEZ AR FEIZ. *Harvey 361*

TON KELVEN.

C'houi holl a zo kristenien,
Ha ne glevit-hu ket
Eur c'hri zo leun a anken
Euz pevar c'horn ar bed ?
Selaout holl hor pedenn,
Hor c'hlemmou truezuz,
Selaout petra c'houlenn
Ho preudeur malheuz.

Diskan.

Breudeur, ni glev ho klemmou
Euz ann tu all d'ar mor ;
D'ho mouez ha d'hoc'h ezommou
Hor c'haloun zo digor.
Ni a roio aluzenn
Evit sikour ho pro,
Ni a zavo beleien
Ha d'ehoc'h ni ho c'haso.

Kristenien a Vreiz-Izel,
O pet truez ouzomp,
Ar joauzded eternal
Ann Env a c'houlennomp ;
Rak ni zo var ann douar
Tud paour hag emzivad,
N'anavezomp, c'hui her goar,
Na Jezuz nag he Dad.

Guech all, pell diouz sklerijenn,
Pell diouz lezenn Doue,
Er memes tenvalijenn
Ho pro a ioa ive.
Mil bennoz d'ann ebestel
O deuz ho kelennet ;
Grit kement all, tud fidel,
Brema enn hon andred.

C'houi brema zo evuruz
Poc'h euz ar sklerijenn
Euz ar Feiz ker presiuz,
Ho pro a zo kristen,
Hag ar sklerijenn gaer-se
N'oute disparisa,
M'ar deuit dre ar garante
Enn ho touez d'he maga.

M'an deuz Jezuz lavaret :
Ne ankounac'ho ket
Eur verennad dour roet
D'ho preur enn he sec'hed :
Petra dalvo, kristenien,
Ar guennek benniget
'Vo dreizhan da virviken
Kalz eneou prenet ?

Ah ! Doue ra roi kalon,
Nerz d'ar misioner,
Joa ha konsolation
Enn he boan ha mizer ;
D'ehoc'h ive bennoz Doue,
D'ehoc'h-hu holl, kristenien,
A roi gant guir volonte
Ho kuennek d'her zouten.

Deut eta, belek iaouank,
Kuitait bro, mamm ha tad,
Daoust d'ann daelou puill ha stank,
A skuill ho taoulagad,
Deut *saeou du Breiz-Izel*,
Hast on euz d'ho klevet
O prezeg ann aviel
E bro ar baianed.

E fleurenn ho iaouankiz
Kalz ama rank mervel,
Mes ho ene a c'houniz
Ar vuez eternal :
Roudou ho zreid benniget
'Jom merket enn hor bro,
Ra zeuio c'hoaz, Bretouned,
Kalz c'hoaz henvel outho !

Tud fidel a vir galon,
O velet ho foaniou,
Sikourit hor mision,
Savit d'eomp ilizou ;
Digasit ar skol gristen
D'eomp ha d'hor bugale,
Ni bedo evit goulenn
Varnhoc'h bennoz Doue.

77 KANTIK AR PAB.

TON : *Ni ho salud, rouanez ann Elex.*

Diskan :

O Tad Santel, ni fell d'eomp holl plega
Dindan ho torn savet d'hor benniga,
Ni roio d'ehoc'h, evit harpa ho tron,
Hon aluzenn, hor breac'h hag hor c'halon.

Ar Pab, er skol gant ar Spered-Santel,
A zo e penn ann eskibien fidel,
Komzou ar Pab a verk ar guir gredenn,
Galloud ar Pab a c'houarn peb kristen.

A berz ar Pab, beleien peb parrez
Euz ann envou a zalc'h d'eomp ann alc'houez ;
Ha setu stag ar memprou ouz ar penn
Ha great eur c'horf euz ann holl bopl kristen.

Euz a viskoaz hag enn amzer da zont,
Euz ann Iliz ar Pab eo ar mean-font ;
Rak-se Simon *Mean* zo bet leshanvet,
Var ar mean-ze ann Iliz zo savet.

Gouzout a reomp, ni tud divar ar mez,
Var ar mean-font e saver ann tiez :
Ti var ann treaz a zo buan skubet
Gant ann arneuz hag ann avel follet.

Ar Pab, ar Pab, euz ann Iliz ar penn,
Zo evidomp ar c'hef euz ar vezenn,
Mar fell d'eomp-ni e ve glaz ann deliou,
Dalc'homp d'ar brank, d'ar c'hef ha d'ar griziou.

Eul lestr var vor a rank kaout eur sturier,
Hag ann Iliz zo fiziet e sant Per,
Ha da viret na vo ar vag beuzet,
Ennhi Jezuz gant Per zo azezet.

78 BAGIK SANT PER.

TON NEVEZ.

Eunn deiz Jezuz a velaz var mor Jenezareth
Simon hag he vreur Andre a ioa o klask pesked :
Ganen-me deut, emezhan, laoskit ar pesket mud ;
C'houi vo c'hoaz pesketourien, mes pesketourien tud.

Diskan.

Per eo sturier ann Iliz hervez komz hor Zalver,
Hag ar Pab a zo brema en deuz galloud sant Per.

O micher dreist peb micher ! teuler he rouejou
Ha digas bagadou tud betek porz ann Envou...
Nann, biskoaz al lestr kaera, karget a beziou aour,
N'en deuz talvezet bagik, bag Per ar pesketour !

Agreiz ar c'hoummoul tenval ped guech ann drouk-spered
En deuz klasket goeledi bag ha martoloded ?
Mes sant Per, aounik guech all, en deuz desket bale,
Kerzet a ra var gein ar mor, he zourn e dourn Doue.

Bag ann Iliz gant ar mor n'hell ket beza lounket,
Ouz Satan hag he gounnar harpa a raio bepred.
Diredit, avelou foll, flastrit al listri braz...
Bagik sant Per enn eonenn a ia hag a iel c'hoaz.

Aliez, enn tarziou guenn, pedenn hon Tad Santel
A zo henvel ouz hini martolod Breiz-Izel :
Va Doue, va zikourit evit tremen ar Raz,
Rag va bag a zo bihan hag ar mor a zo braz !

Jezuz, kousket er vagik, p'hen galv ann Tad-Santel,
A zihun hag a lavar ho c'hourdrouz ann avel :
Beg ar Raz c'houi dremeno hag aod ann anaoun ;
Me zo ganeoc'h da viken, kerzit'ta, n'o pet aoun !

Dispak he rouejou sakr, Per, ar pesketour mad,
Dre gement mor zo er bed ne skuiz o rouenvat ;
Ann dour sall a strink er vag, mez peskerez founnuz
A ro kaloun, kaloun grenv, da besketour Jezuz.

Ma chomomp e bag sant Per ni c'hello douara
Var ann aochou evuruz zo du-hont o venna.
Laouen holl ni lavaro : Setu ar Baradoz !
Bennoz d'ehoc'h, o va Jezuz, sant Per, d'ehoc'h-hu bennoz !

Amen.



TAOLENN

	Pajenn.
A benn nebeut bloaveziou.	57
Adoromp holl.	28
Allaz ! na c'houfe den koumpren	50
Ama pell diouz ann trouz.	83
Ar c'henta mister truezuz.	90
Ar goanv en deuz kuiteat.	125
Ave, maris stella	88
A-vihanik am euz pec'het.	51
Ar voien d'eh em asuri	102
Bemde, bemnoz hag e peb ti.	101
C'houi holl a zo kristenien	131
Dalc'hit sonj mad, kristenien.	61
Dallet oamp holl.	108
D'ar Pantekost, ar Spered-Glan.	31
Deomp d'ar garnel	46
Diskennomp holl, kristenien	48
Doue en devez va c'hrouet	29
Doue, guir bried.	53
Deut holl ha deut gant fe	67
Deut, va Doue	69
Elez euz ar Baradoz	65
En em gonzolit evit mad	17
Er c'henta mister gloriuz	91
E sakramant ar binijenn	32
E tal ho kroaz, leun a anken.	56
Eunn arc'hel a berz ann Aotrou.	16
Eunn deiz, Jezuz a velaz	135
Eunn Doue a zeu d'ho kervel.	33

	Pajenn.
Eunn Doue hebken a adori	7
Euruz ann hini	85
Euz a vrema betek ar maro	29
Evit beva gant levez.	100
Gloar da Jezuz	76
Guir vugale ar Verc'hez	111
Holl vugale Adam	115
Jezuz, peger braz ve	77
Kaloun dous a Vari	106
Kanomp eur c'hantik nevez	118
Kaset e voue gant Doue	120
Kavet em euz ar peoc'h	62
Kredi a rann.	26
Mab den, sonjit	44
Magnificat.	87
Mari, c'houi zo d'ann holl bec'herien	114
Mari, hor mamm garantez.	112
Me a laka ma fizians	95
Me ho salud, korf ma Zalver.	27
M'em euz preparet eur banked	70
M'hoc'h ador, ma Doue	3
Meulomp holl da james	75
Nep a gar beva fur hag euruz	130
Ni ho salud gant karantez.	18
Ni ho salud, kroas benniget	81
Ni ho salud, o leun a c'hras	92
Ni ho salud, rouanez ann Elez	93
Ni ho salud, steredenn vor	91
O Guerc'hez Vari, leun a druez.	110
O Guerc'hez Vári, va vamm ger	113
Oh ! nag hirr eo ann noz	69
O Kaloun zakr euz va Jezuz	73

	Pajenn.
O Tad, Mab, ha Spered-Santel	18
O Tad Santel.	134
O va ene, kanomp bemdez.	105
O va Jezuz.	28
Pa zaoulinomp	59
Pa voue ganet Jezuz	122
Pec'het em euz	52
Peger kaer ez eo Mamm Jezuz	104
Piou lavaro	123
Poent ez eo d'eoc'h, pec'her	34
Ra viot, va Doue, glorifiet.	97
Santez Anna, hor patrounez	127
Sant Joseph, pried Mari	128
Santez Mari, Mamm Doue.	94
Selaouit, va Jezuz	45
Selaou, va breur ker	47
Sellit piz ouz ann taolennou	36
Setu eiz kelennadurez	86
Sonjit, den faziet	37
Sonjomp d'ar genta dizenez	89
Spered-Santel, Spered a sklerijenn.	26
Tavit, o tud heb kredenn	39
Tremenet eo ar miz santel.	126
Va diouallit, Elik Doue	131
Va Jezuz, va Doue	54

FIN.



3072